

EMSAV

mmmm mm m mm m mm m
mm mmm mm mm m mm m
mm mmm mm mm m mm m
mm mm m m mm mm m
mm mm m m mm mm m
mmmm mm m mm mm mm m
mm mm m mm mm m
mmmm mm m mm mm m
mmmm mm m mm mm m

KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 34 - Here 1969

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

T a o l e n n

Amkan, pal, finvez p. 295

Kendael war armerzh Iwerzhon p. 302

Displegadenn gentañ : Skouer Iwerzhon p. 302.

Eil displegadenn : Ur sell war armerzh Iwerzhon p. 306.

An Emsav hag ar Vro (19) [EMVR-98 - 100] p. 309

Kemennadenn Stroll-Leviañ E.S.B., Klozadur prantad ar
frammañ politikel. Dezrann daou zarvoud p. 309;

Lizheroù p. 315; Kemennadenn a-berzh S.A.D.E.D. p. 316.

Notennoù politikel (8), Bevennadur beli al levierion.

I.- Pennaennoù ar bevennadur : Ar frankizioù foran . . p. 317

AMKAN, PAL, FINVEZ

Embann a reomp amañ testenn an div gentel roet e Mur d'ar 5 ha d'ar 6 Eost da geñver Devezhioù Studi an Deskadurezh Vroadel.

Kentel gentañ : Termenadurioù.

Pal

Pa lavarer : pal an Emsav zo ar Stad vrezhon, e tiogeler meur a dra :

- da gentañ, e laka an Emsav dirazañ en e zremmwel ur sevenadenn fetis, bedel; hag e ren e oberiadegezh e sell diraez ar sevenadenn-se;

- d'an eil, e paouezo an Emsav a vezout d'an deiz ma vo savet ar Stad vrezhon.

Ar pal zo un termen. Pal a dalvez bevonn, harz. Ar pal zo ar poent ma paouez un ober a gaout poell o vezañ ma'z eo sevenet. Par ar sevenidigezh eo ar pal.

Setu aze un termenadur eeun eus ar pal. Er politikerezh avat ez eo un tammig kempleshoc'h an traoù, o vezañ ma n'eo ket ar pal bepred ur par stabil a dizher ur wech da vat. Displegañ a reomp.

Ar Stad zo ar pouezusañ amplegad eus padegezh pep kevredigezh politikel, - setu perak ez eo pal politikel an Emsav krouiñ ur Stad. Hogen ar Stad hec'h-unan ne vez nepred dreist arvar an distruj, ha stourm a rank ober dibaouez evit padout. An Emsav a baouezo moarvat evel diazezer ar Stad, nemet e kendalc'ho evel gwardour ar Stad en devo diazezet.

Kentañ damant pep Stad eo padout. Alese an daou bal kentañ eus pep Stad : an diogelroez diavaez hag an diogelroez diabarzh. Anat eo e kemer ar palioù-se neuizioù nevez bemdez, rak diogelroez hiziv ned eo ket ken diogelroez dec'h. Pal an diogelroez a loc'h gant kerzh an amzer. E dizhout a reer hiziv hag e dizhout a rankor warc'hoazh adarre.

Anadiñ a ra aze unan eus arvezioù ar politikerezh : an amzer-iegezh. Bemdez e vez adkrouet ar bed. Bep beure e tihuner ar bed kozh ha war un dro e c'haner ur bed nevez. Ha n'eo ket ur politiker an hini na ra ket bep beure outañ e-unan ar goulennoù-mañ : pe zremm o devo hiziv palioù dec'h ? Ha lec'h en devo e bed hiziv ar pezh am eus graet dec'h ? N'eus nepred netra diazezet da vat. Ne vez nepred netra diogel, na dazont ur Stad na, kent a se, dazont un emsav.

Ar pal zo enta termen amzeriek an ober politikel.

Petra a dalvez an adanv amzeriek amañ ?

Da gentañ ez empleg ez eo bedel ar pal. Savlec'hiet eo er bed ma striver d'e dizhout. Diogelroez ur riez ez eus pe n'eus ket anezhañ war an dachenn, eleze er riez hec'h-unan, - e nep doare ned eo un diogelroez speredel a biauwer daoust da drubuilhoù ar bed-mañ : e dalc'h eeun trubuilhoù ar bed-mañ emañ. Heñveldra, an dispac'h a empleg moarvat an dispac'h speredel, met keit ha ma chom er par speredel n'eus ket anezhañ : an dispac'h zo un eilpennadur a c'hoarvez en ur riez eus ar bed ha n'eo ket e nep trabed.

D'an eil, e verk an adanv amzeriek e vez amparet ar pal en amzer istorek. Ned eo ket roet ar pal ur wech da vat e deroù an ober gouestlet d'e seveniñ. Etre an ampoent ma'z eo mennet evit ar wech kentañ hag an ampoent ma'z eo tizhet, e kemm dizehan dremm ar pal; en degouezh boutinañ e vez ar pal mennet ha tizhet war un dro dizehan, hag an daelerezh etre mennout ha tizhout eo a zo keflusker emdroadur e zremm. An emdroadur-se a c'haller termenañ en ur yezh resis evel an tremen eus un hevelep hanvoud dre hennadoù disheñvel; daoust ma'z eo ar pal an hevelep hini ez emdro e zremm, e hennad, gant an amzer. An hevelep Emsav eo hini 1919 ha hini 1969; dezhañ ez eus un hevelep pal istorek, ha koulskoude n'he deus ket dremm ar pal-se paouezet a emdreiñ abaoe 1919. Ne emdro ket forzh penaos avat : ur poell zo d'an emdroadur; ar poell-se eo a ra d'an Emsav bezañ an hevelep Emsav; ar poell-se ivez eo a ra d'an emdroadur en em amparañ e furm un istoregezh. Ar pal zo enta penn poell an ober politikel, ha kemer a ra e furm istorek, e fetisted, dre ar strivoù kaset deiz goude deiz, - ar pezh a ouiemp endeo dre skiant-prenet. Ur pal n'eo ket ur mennoz a daoler er bed gant fiziañs ma teuy da wir dioutañ e-unan. Ur pal zo afer bemdeziek ar vuhez a-bezh. Keflusker an Istor ne dro ket gant dour plat ar mennoziou, met gant eoul fetis ar buheziou.

Amkan

Ur meizad stag ouzh hini ar pal eo hini an amkan. E berr, ez eo an amkan unan eus pazennoù an diri a gas d'ar pal.

Evel ar pal ez eo an amkan bedel ha savlec'hiet en amzer istoriek. Ma ne vije anezhañ avat nemet ur bazenn blaen eus an diri a gas d'ar pal, ne dalvezje ket ar boan gouestlañ dezhañ ur rann studi a-ratozh. Met pouez a zeu da veizad an amkan dre berzh ma n'eo ket dremm ar pal ur furm stabil, - ur furm amzeriek eo, evel m'hon eus gwelet. Emdreiñ a ra ar pal, hag emdreiñ a ra o kemer harp war amkaniou, - an diri e-unan a sav o kemer harp war e bazennoù. Da heul, e tenn an amkan da gaout un neuz fraeshoc'h eget ar pal, e tenn ar pal da steuziañ ha da zifetisaat. Pell diouzh bezañ un heol diflach war an dremmwel o sklerijennañ a-vloc'h an hent a-bezh en e holl dennadoù, ned eo ar pal netra muioc'h eget disoc'h ar jedadur diwar an hent ergerzhet hag an tennadig a weler dirak betek ar c'horn-tro nesañ. Setu perak e vez aesoc'h en em glevout war un amkan eget war ar pal. Termenadur un amkan a c'houlenn ar gweladur eeun eus devoùoù

anat d'an holl. Termenadur ar pal a c'houlenn piaouadur emouiziek an istoregezh. Kemeromp ur skouer.

Pa voe dispennet an Emsav goude an eil Brezel-bed e kavas an emsaverion repu en ober sevenadurel. Eno o devoe da stourm ouzh ul ledemsav bleniet gant ar galloud sujer a glaske distrujañ unvanded nevez diraezet ar yezh. Amkan ar mare a voe trec'h ar yezh peurunvan. Meizet e voe da gentañ an amkan-se evel unan eus pazennoù politikel an Emsav war-du e bal. Gant reuziad ar stourmadoù avat ez eas ar pal-se betek damsteuziañ ha kemer un neuz trabedel, - enkadenn ar bloavezhioù pemont e voe. O vezañ ma oa gennet emsaverion ar mare-se er stourm evit ar yezh peurunvan, e tenne trec'h ar zh da anadiñ evel ur pal, ha pal stadel an Emsav da vont diwar wel istorek. Pa adstagas an Emsav da savelañ amkanioù e darempred fetis gant e bal politikel gwirion, e nac'has emsaverion 'zo dilezel ar stourm kent, o tiskouez e-se e chome o fal e par amkan ar yezh; abaoe, n'o deus gouezet nemet danzen isamkanioù d'an amkan-se, - er bloaz-mañ endeeun e welomp Kuzul ar Brezhoneg oc'h ober e c'houlenn evit mont e-barzh Galv, o tiwelout betek ster ar stourm evit ar yezh peurunvan renet pemzek vloaz 'zo.

Anadenn an tre a c'hoarvez dres eus seurt dispredadur an amkanioù; drezi e tiskoach ar stourmerion o deus kollet buhezadur ar pal hag a ra o fal eus an amkan distremenet. Aes eo kompren penaos ez eo anadenn an tre pourchaserez al ledemsav.

Hent, treug

Amkanioù a saveler a-benn tostaat d'ar pal. An amkanioù a c'haller meizañ enta evel tennadoù eus an hent o vont war-du ar pal. Merkomp diwar vont ez eo keal an "hent" unan eus ar re a zo bet arveret ar muiañ en Emsav, - en ur ster skeudennel hogos bep taol, dav eo henn anzav. Koulskoude, meizad an hent a veneg un devoud fetis, - un devoud amzeriek eo avat, hag hon diaraogerion, diampart c'hoazh da embreger ar meizadoù amzeriek, a rankas e bleustriñ e stumm ur c'heal skeudennel.

An hent ned eo ket hepken ur skeudenn lavar, un droienn lennegel lakaet goude taol war disoc'h un dizurzh a oberoù hag a zarvoudoù, pe a-raok taol war aridennad an hunvreoù. Goût a ouzomp bremañ ne dizhimp ar pal nemet mar meizomp ha mar meromp an oberoù hag an darvoudoù hervez ur boellelezh istorek oc'h unaniñ sol, pal ha hent an Emsav. E-se ez eo hent an Emsav e meur a zoare heñvel ouzh ar steuñvoù danzeet gant an embregerezhioù hag ar gouarnamantoù, - setu perak e reer e degouezhioù 'zo gant ar ger "treug". Merkomp koulskoude e tleer arverañ "treug" e-keñver ur steuñverezh pervezh o lezel nebeut a lec'h gant ar riskladur istorek, - evel-se e c'hellomp envel emdroadur ar pal gant kerzh an ober d'e dizhout. Gwelloc'h avat mirout ar ger "hent" pa lakaer ar riskladur istorek e kont.

Evel ma'z eo diskouezet e lec'h all (1), ez eo anien an hent hini ur poell. Rediegezh diabarzh an hent zo bezañ kempoell; tremen a ra eus ur fetis kempoell d'ur fetis kempoell all.

Finvez

E-kichen meizadoù ar pal hag an amkan ez eus ur meizad all a ranker termenañ : ar finvez eo. Ar mad, ar reizhded, ar rezid zo finvezioù. N'int ket evel ar palioù sevenadennoù fetis eus ar bed, ensavadurioù. Ne saver ket embregerezhioù ma vent an disoc'h anezho : trehontel int d'ar beziadoù, - ne ziazezer ket ar mad evel ma tiaz-ezer ur Stad; forzh petore embregadenn a gasfed d'he zermen, emañ bepred ar finvezioù en tu-hont d'an termen-se. Ouzhpenn-se, sol ar finvezioù n'emañ ket er bed ergorel : ur Stad zo bezant er bed, hec'h anaout a reer dre ur stadadenn; en enep, sol ar mad, ar reizhded, ar rezid ne dizher ket dre ur stadadenn, met dre ar gredenn : trabedel eo ar finvezioù.

Lavarout a reer e vez an amkanioù isurzhiat d'ar pal, hag ar palioù d'ar finvezioù. Met, e gwir, daou seurt disheñvel a isurzhiadur zo e kaoz aze. An amkan a rank bezañ isurzhiat d'ar pal, ur redi kalvezel eo, un ampegad eus berzh-mat an embregerezh. Pa lakaer avat e tle ar palioù bezañ isurzhiat d'ar finvezioù, ez eo un dlead divezel a verker. Ar prederour gall J.MARITAIN, da skouer, a lavar ez eo "fazi bras Europa () bezañ ankouaet an isurzhiadur end-eeun eus ar palioù politikel d'ar finvezioù speredel" (2).

Gwelet hon eus ez eo savlec'hiet ar pal er bed end-eeun ma striver d'e dizhout; da heul hon eus klozet o verkañ ez eo beziadel, bedel ar pal dre natur.

Ar finvezioù, en enep, a anavezer dre an durc'hadur a roont d'ar vuhez ha d'an oberoù. Ne saver ket embregerezhioù evit seveniñ ar finvezioù peogwir e c'houlenn ar finvezioù bezañ embreget gant ar vuhez en he fezh. Trabeziadel, trabedel int dre natur.

Er gentel a zeu e studiimp petore binvioù-dezrannañ ez eo an tri meizad : amkan, pal, finvez, ha dreist-holl penaos e talvez an daou-mañ diwezhañ war dachenn an ober politikel.

Eil kentel : Dedalvezadur d'ar politikerezh.

Finvezioù hag istoregezh

Dec'h hon eus gwelet un termenadur eus an tri meizad : amkan, pal, finvez. Un termenadur, pe gentoc'h ur braslec'hiadur, ul lec'hiadur-loc'hañ.

Diwar al lec'hiadur-loc'hañ-se hon eus tennet dreist-holl un enebadur etre pal ha finvez, - an amkan o vezañ goude-holl un arvez oberatael eus ar pal.

Ar pal zo termen amzeriek an ober politikel. Ar finvezioù zo ar stern trabedel ma rener ar vuhez ha, da heul, an durc'hadur trabedel a roer da oberoù ar vuhez, d'an ober politikel pergen.

Kuit a chom en ur par hollek ha difetis, e stagimp diouzhtu gant

ur skouer dibarek ha fetis : petore arver a c'hell kaout an daou veizad-se, ar pal hag ar finvez, en Emsav ? Ar skouerioù hon eus roet dec'h a ro un alberz eus ar c'horvo a c'haller tennañ anezho evit dezrannañ darvoudoù Istor an Emsav. Hiziv e stagimp dre ur penn all eus ar gudenn.

Pa zegouezh an danvez emsaver en Emsav, ez eus anezhañ un den oc'h anavezout finvezioù : karantez, rezid, reizhded hag all. Ar finvezioù-se n'int ket azonus eus an danvez emsaver. Tu zo da lavarout zoken ez int boutin etrezañ hag an denelezh istorek.

(Digoromp krommelloù amañ, ha lakaomp ur goulenn : penaos emañ ar finvezioù-se tra an denelezh istorek ? Petra da gentañ a anver denelezh istorek ? An denelezh istorek zo an hini he deus un Istor hag a zo gwriziennet ennañ. Ne zisplegimp ket amañ dre ar munud meizad ar c'hevala istorek, anavezet mat bremañ. A-walc'h eo dimp merkañ e kav mab-den e finvezioù dre hent kevala istorek an denelezh, - kevala e vro hag e relijion da gentañ penn. Ouzhpennomp ne c'hell mab-den seveniñ e finvezioù nemet dre an ober istorek, - kounaomp ez eo termenet an Dasprenadur gant ar Gristeniezh evel un argerzh istorek, an argerzh istorek-diazez ma steuz an diforc'h etre pal ha finvez.)

Evit ar Brezhon, klask an Emsav zo klask seveniñ finvezioù denel. Furmet en deus ar finvezioù-se diwar gevala istorek an denelezh, o seveniñ a ray dre an Emsav; dre henn ober, ez enlouc'ho war an Emsav an durc'hadur a ro ar finvezioù-se d'ar vuhez. Evit an hini ez eo dont d'an Emsav kemer hent ar rezid, e vo krouiñ frankiz Breizh kement ha seveniñ muioc'h a rezid evit an denelezh. Hent ar reizhded a gaso unan all d'an Emsav, - ha stourm ar reizhded e Breizh a roy dezhañ an tu da astenn an hentoù reizh e-barzh kevala istorek an denelezh. Un trede, deuet da emsaver dre garantez ouzh e nesañ, a vo e labour en Emsav un andon a sklerijenn evit Breizh ha, drezi, evit an denelezh a-bezh.

Dre an ober istorek eo enta e vez furmet ha sevenet ar finvezioù. E par ar finvezioù e kavomp an hevelep argerzh krouiñ kevala hon eus deskrevet c'hoazh. An ober istorek a-vremañ a zeu dezhañ e zurc'hadur divezel diwar finvezioù savelet dre an ober istorek kent; ha d'e dro e savel finvezioù a dalvezo da gevala d'an ober istorek da zont.

(Penaos barn ur sevenadur ? Mar degemerer isurzhiadur ar palioù d'ar finvezioù, ez eo dre ar finvezioù a anavez d'e re e c'hallor e varn. War sevel emañ keit ha ma uhela barr e finvezioù; en enep, emañ war e ziskar diwar ma tiskenn barr e finvezioù ha ma tisleber ar re-mañ. N'eo ket skedusted an arz, araokadur ar ouezoniezh hag ar c'halvezerezh, pinvidigezh an armerzh a dalvez da briziañ uhelled ur sevenadur, met barr ar finvezioù a stergn e vuhez.)

Un arvez all eus ar c'hevala istorek zo da welout amañ c'hoazh. Anaout a reomp ar saveleñ : an hini na genderc'h ket ned eo perc'henn war gevala ebet. An hini ne gemer ket perzh en Emsav dre e

labour n'emañ ket e zorn war ar c'hevala istorek brezhon ha n'en deus ket ar reizh anezhañ. An hevelep tra eo gant ar finvezioù : neb na gemer ket perzh en un ober istorek n'en deus ket ar reizh eus finvezioù mab-den. Ur reizh diwar glevout, ur reizh-heklev, difetis, kealiek, ankrouus en deus eus ar reizh, ar reizhded, ar garantez. N'eus nemet an hini a gemer perzh en un ober istorek a oufe kaout ur reizh diwar vuhezañ, fetis, krouus eus finvezioù mab-den. Ne oar petra eo ar reizh nemet an hini a grou reizh er bed.

Gwelout a reomp amañ a-dostoc'h reizhad ar finvez. Merzout a reomp an ere strizh a zo etre ar finvezioù hag an istoregezh. Ne c'hell mab-den furmiñ finvezioù nemet dre an ober istorek, pe en ur yezh kristen : ne c'hell un den en em dreiñ war-du Doue anez gwriziennañ en Istor an denelezh, anez sammañ istoregezh mab-den.

Spisoc'h e teu ivez roll an emsavioù en Istor. Evel bleunioù en ur wezenn e vez ar finvezioù e buhez mab-den : goude skediñ e weñvont hag e kouezhont; hag evel ma tegas pep nevez-amzer bleunioù nevez e teu ivez gant pep emsav korfoù nevez d'ar finvezioù.

(N'eus nemet un emsaver a oufe reizhañ an emsavioù hag an dispac'hioù all. Mar selaoufed brogarourion vrezhon 'zo e vefe kefridi an Emsav diverkañ heuliadoù an Dispac'h gall ha diwall Breizh diouzh heuliadoù an Dispac'h soviedel. Moarvat n'en deus ket Dispac'h 1789 dispennet ar spered impalaerel gall na Dispac'h 1917 torret an impalaerouriezh rusian, ha brav eo diskouez an direizhioù hag ar gwaskerezh c'hoarvezet d'o heul. Kizidikoc'h eo avat an emsaver ouzh al lanv eget ouzh an tre, ouzh ar sevel eget ouzh an diskar. Mar barn gwanoù al lanv, ma ne ziwel ket direizhioù an tre, e nac'h groñs dianaout krouusted emsav rezidelour an 18^t kantved hag emsav kevarzhelour an 19^t kantved.)

Pal ha finvez : poellouriezh ha divezouriezh

E darempred strizh emañ an ober istorek, an ober politikel gant finvezioù mab-den. Dav eo bremañ ensellout pe furm a zo d'an darempred-se.

Gwelet hon eus ez eo evit ar Brezhon klask an Emsav klask seveniñ finvezioù denel. Oberiadegzh an Emsav avat zo kevreizhet diouzh palioù, ha n'eo ket diouzh finvezioù. Mard eo ar reizh, ar reizhded, ar garantez finvezioù evit an emsaverion, ez eo pal an Emsav krouiñ ur gevredigezh vrezhon nevez hag ur Stad dezhi. Penaos reizhañ an darempred etre ar finvezioù-se hag ar pal-se ?

Eomp d'ar fetis, da lavarout eo da vuhez an emsaver. An emsaver a gemer perzh dre e labour e diraezadur palioù an Emsav; perzh a gemer ivez e sevenidigezh finvezioù mab-den dre an durc'hadur divezel a ro d'e labour emsavel. Daou breder distag zo aze, daou bleustr disheñvel evito da vezañ yevet e-ser an hevelep oberoù; da heul, div skiant pleustrek da savelañ : ur boellouriezh evit a sell ren an oberoù diouzh pal an Emsav, un divezouriezh evit a sell reizhañ an oberoù emsavel diouzh finvezioù mab-den.

E lec'h all (3) hon eus diskouezet penaos ez eo poellouriezh an Emsav, eleze skiant poellelezh fetis an Emsav, frouezh ur mone-done daelerezhel etre ar par damkanel hag ar par embregel. En hev-elep doare e tiskouezer ez eo divezouriezh an Emsav, eleze skiant divezelezh fetis an Emsav, frouezh ur monedone daelerezhel etre par an oberoù ha par ar finveziou.

Un nebeut diskleriadurioù a vo deuet mat hep mar.

Evel ma'z eo ar poell bepred ar poell eus ur c'horf fetis (4), ez eo an divez bepred an divez eus un ober resis. Displegañ a reomp.

Ne c'haller ket barn ha poellek pe get eo un ober hep e veizañ e-keñver poellelezh an embregadur a-bezh. Mar gwelit un den o reiñ lamm d'unan all hag o terc'hel anezhañ en diaskren, e tastumot mart-eze emañ o lemel e vuhez digantañ. Pa anavezot an istor a-bezh avat e ouezot e oa an "argader" un den a vire ouzh unan all a emlazhañ. Poellouriezh an Emsav ned eo netra estreget ar skiant a ro an tu da anaout "an istor a-bezh", ha da veizañ pep darvoud ha pep ober evel un arroud anezhañ, - skiant an darempredoù fetis ha poellel war un dro etre sol, pal ha hent an Emsav e pep mare. Ar skiant pleustrek-se ne vez ket perc'hennet en un devezh : anaoudegezh sol, pal ha hent an Emsav ned eo ket un anaoudegezh plaen ha levrek, ned eo ket muioc'h ur chemet kantouezel gounezet dre ur pleustr diemvarn. O risklañ e vez bepred sol, pal ha hent an Emsav etrezek furmoù nevez. Diaesañ micher ar bed eo sturiant ar riskladur istorek. Micher an emsaver eo koulskoude.

Heñveldra, ne c'haller ket barn ha divezek pe get eo un ober hep e veizañ e-keñver divezelezh ar sevenadur a-bezh. An "argader" a venegemp bremaik, zoken pa vo anavezot "an istor a-bezh", a vo barnet disheñvel hervez an divezouriezhoù : gant unan e vo komprenet e ober evel un ober a garantez ouzh an nesañ, gant unan all evel un taol a-enep da frankiz an danvez emlazher. Evel ma rank an Emsav savelañ e boellouriezh dibarek, e rank ivez termenañ un divezouriezh emsavel. An divezouriezh-se ne c'hell ket dont eus reolennoù savet a priori. Ar skiant pleustrek eo eus buhez an emsaverion dalc'het war un dro gant redi an emgann politikel hag an dlead da isurzhañ an emgann-se d'ar finveziou denel. Evel e boellouriezh e teu divezouriezh an Emsav e disoc'h un imbourc'h daelerezhel diziwezh : aze ivez e vir ar riskladur istorek ouzh ar savelidigezh a glozañ nepred. Lavaromp diouzhtu ne vez nepred divezouriezh an Emsav dreist ar varn. Barnet e tle bezañ an Emsav diwar an doare ma ro korf da finveziou mab-den dre e zivezouriezh. Met lavaromp ivez e rank oberoù an emsaverion bezañ barnet e-keñver divezouriezh an Emsav. Pa vez da skouer ledemsaverion 'zo, diemuez ouzh an dislavar en o buhez, o tamall d'an emsaverion bezañ rust en o c'heñver, ned eo ket degemeradus o c'hlemm, un emgondaonadur n'eus ken anezhañ.

(1) Sl. Poellelezh an Emsav, Emsav 30/163; Lec'h al ledemsav en daelerezh-dieubiñ, Emsav 31/195; hag ivez Petra eo ar fram ? Emsav 14/33.

(2) J.MARITAIN, Primauté du spirituel.

(3) Sl. Poellelezh an Emsav, Emsav 30/163.

(4) Sl. Lec'h al ledemsav en daelerezh-dieubiñ, Emsav 31/195,/197.

KENDAEL WAR ARMERZH IWERZHON

Lakaet er-maez an Notennoù Armerzhel, a zo enno ar binvioù retañ evit studiañ an armerzhouriezh, n'he deus ket Emsav betek-henn embannet kalz pennadoù war an armerzh. Abaoe derou ar bloaz-mañ dreist-holl o deus ranket an emsaverion plediñ muioc'h gant ar c'hudennoù fetis o doa da ziskoulmañ en Emsav eget gant forzh petra all. Met stag eo da greskiñ an darempredoù gant an diavaez : goude ur prantad ret a entroadur ez eo deuet prantad an eztreiñ. Setu perak e krogomp amañ gant embannadur testennoù a-zivout armerzh Iwerzhon. An testennoù-se n'int ket bet displeget dre gomz. Koulskoude en o c'hinnigomp evel kendael, rak enno e kaver savboentoù disheñvel war an hevelep danvez. O intent a reomp evel derou ul labour difraostañ a ranko en em astenn ha prientiñ astennidigezh an Emsav.

Displegadenn gentañ : Skouer Iwerzhon.

Ar Stad vrezhon a fell dimp sevel. Evit tizhout ar pal-se e rankomp bezañ prest da gemer ar galloud ha da ren ur politikerezh efedus war an holl dachennoù : deskadurezh, yec'hed, gounezerezh, pesketaerezh, hag all. Ne dalvezfe da netra adkeltiekaat Breizh, ne vefe ket tu zoken d'henn ober, mar rankfe hor c'henvroiz divroañ mui-ouzh-mui hag hon armerzh mont da get evel en deiz a hiziv. Mar rankfe barr-bevañ Breizhiz kouezhañ izel-tre da zeiz an dieubidigezh en o defe abegoù evit goulenn an adstigidigezh ouzh Bro-C'hall. Ne c'haller ket brezhonekaat un dezerzh. Evit padout he devo ar Stad vrezhon ezhomm eus un diazez armerzhel start.

Kentelius-kenan eo er c'heñver-se skouer Iwerzhon evidomp. Daoust ma'z eo ur vro geltiek, ar vro geltiek dieub nemeti, heñvel a-walc'h ouzh Breizh (stad ar yezh, pouez ar gounezerezh, diouer a ijinerezh ponner, diouer a zanvezioù krai hag a zanvezioù gremm, grevusted an divroadur), ne vez ket sellet peurliesañ ouzh Iwerzhon evel ouzh ur skouer. Gwir eo n'eo ket deuet a-benn renerion ar riez dieub da adkeltiekaat ar vro na da wellaat he stad armerzhel (a-raok ar bloavezhioù c'hwegont). Displeget e c'hell bezañ o c'hwitadenn dre arbennoù kadoniel ha politikel : ar vroadelourion ne oant ket prest da gemer ar galloud ha n'o doa ket a-walc'h a dud stummet; ouzhpenn-se e voe lazhet an dibab anezho e-doug emsavadeg Pask, ar

brezel-dieubiñ hag ar brezel-diabarzh, ha kemeret e voe ar galloud gant ledemsañverion ar mare. N'eo ket diboell soñjal o deus c'hwitet ivez en arbenn eus an diaesterioù armerzhel kriz o deus kejet outo adalek an dieubidigezh, ouzh o rediañ da ren ur politikerezh gouzañvat war veur a dachenn. Kentelius eo c'hwitadenn Iwerzhon evel ma 'z eo kentelius ar berzh a ra hec'h armerzh abaoe dek vloaz.

Ar berzh-se n'eo ket anavezet a-walc'h en hon touez (ne sellomp peurliesañ nemet ouzh an tachennoù politikel pe sevenadurel), koulskoude ez eus anezhañ un devoud a bouez bras evit dazont Iwerzhon, talvoudus-tre evel stlenn evit an dibaboù en devo an Emsav d'ober e Breizh warc'hoazh. Abaoe 1959 o deus levierion Iwerzhon diazezet ur steuñv armerzhel gwevn ha roet ul lañs bras d'ar greanterezh ha d'an armerzh dre vras. Abaoe an eil Brezel-bed e kreske goustadik-tre kenderc'h broadel kriz Iwerzhon, he feur-kreskiñ (1 % pep bloaz) a oa unan eus feurioù izelañ Europa. War-dro ar bloavezh 1959 eo deraouet an dihun armerzhel hag abaoe e vez ar feur-kreskiñ iwerzhonat a-us da 4 % bep bloaz, eleze ez eus anezhañ unan eus feurioù gwellañ e Kornog.

Pezh a c'haller kavout souezhus a-walc'h eo ar framm politikel ha kevredigezhel ma voe sevenet an dihun armerzhel-se. Iwerzhon n'eo ket ur riez sokialour, pell a se. Renet e vez ar c'hoari politikel gant daou strollad, Fianna Fail ha Fine Gael, dezho mennozioù kentoc'h mirour, heñvel-poch an eil ouzh egile (enebet int evit abegoù istorel nemetken). Gwan a-walc'h e chom strollad al labourerion ha forzh penaos n'eo ket ur strollad dispac'hel; perzh en deus kemeret er Gouarnamant eus 1949 da 1951 met ne seblant ket prest da sammañ ar galloud war e choug er bloavezhioù a zeu.

Daoust hag ur skoilh n'eo ket evit an diorren armerzhel chom ur riez frankizour o lezel an intrudu prevez da c'hoari ? Daoust ha n'o deus ar broioù isdiorreet nemet hent ar sokialouriezh da heuliañ evit terriñ kelc'h milliget ar baourentez ? Amañ e fell dimp mirout ur savboent kalvezel. Hag eñ zo tu evit ur vro "isdiorreet" da drec'hiñ an isdiorreadur en ur virout ur framm politikel frankizour ? Evel just ez eo an dibab etre sokialouriezh ha frankizouriezh un dibab politikel da gentañ, eleze trivliadel evit darn, hag hiniennoù a soñjo moarvat e vefe gwelloc'h da Iwerzhoniz bevañ en ur weriniezh sokialour eget en ur weriniezh daeliek kornogel evel ma ra hiziv. Se avat a sell ouzh Iwerzhoniz...

N'eo ket didalvoud degas en-dro da soñj ar peder elfenn bennañ he deus ezhomm ur vro evit diorren hec'h armerzh :

- ur barr anaoudegezhioù skiantel ha kalvezel uhel, eleze skolioù niverus, uhel al live deskadurezh enno, skolioù-meur, kreizennoù imbourc'h ha darempredoù gant gouezoniourion hag arbennigourion ar riezoù all;
- ur c'hevala paot evit ober ar postadurioù kenderc'hus a roio lañs d'an diorren armerzhel;
- un aergelc'h breidel, kevredadel ha politikel er boblañs a-du gant

an nevezadur hag ar greskidigezh, ur spered-embregañ en holl vicheroù hag en holl gendereoù;

- ur politikerezh hollet evit liammañ ha kendonianñ ar strivoù er parzhioù disheñvel eus an armerzh broadel, peurliesañ ur steuñv stad-el a vo e bal reoliañ an diorren.

Elfennoù all a vefe tu da gavout c'hoazh moarvat, hogen ar peder elfenn-se eo ar re bouezusañ. Evit bastañ d'an holl ezhommoù-se e kav d'an holl arbennigourion, zoken da re Gornog, ez eus ezhomm eus ur galloud kreñv hag ur steuñv start ha kreizennet. Meur a abeg a roont da harpañ al lakadenn-se : mallus-kenan eo an diorren ha kement deiz o vont e-biou a ledana ar c'hleuz etre ar riezoù diorreet hag ar re isdiorreet. An dud o deus ar c'hevalla zo techet d'e gas d'ar broioù diorreet (da skouer, rouanedigoù arab an tireoul a laka o arc'hant e bankoù Helvetia). Ar spered-embregañ a ra diouer ha skoilhoù bras a vez degaset d'an diorren gant temzoù-spered kevredadel pe gravezel (da skouer e kouezh izel-tre kenderc'husted an obererezh armerzhel e-pad yun ar Ramadan er broioù muslimat). Ret-groñs eo d'ar Stad kemer lec'h an intrudu prevez pa ra diouer, ober postadurioù, sevel embregerezhioù ha krœuiñ ar greanterezh. Perc'hennet e vez neuze ar binvioù-kenderc'hañ gant ar Stad. Savet e vez ur steuñv gourc'hennennus a zispleg dre ar munud ar palioù da dizhout hag an hentoù da heuliañ. N'eus meneg ebet da lezel ar c'hevalla prevez da c'hoari diharz en nevid broadel. Dre heuliañ an hent-se o deus gallet broioù isdiorreet seveniñ araokadennoù ramzel.

N'eo ket an hent-se a zo bet heuliet gant ar riez iwerzhonat ha moarvat n'eo ket kennebeut an hini a zere ar gwellañ ouzh degouezh Breizh. Arabat disoñjal emañ Breizh evel Iwerzhon e-touez tachennoù diorreetañ ha pinvidikañ ar bed. Gwir eo e chom isdiorreet Breizh pe Iwerzhon e-keñver broioù all Europa ha Norzamerika; gwir eo e kaver ivez devoudoù a gorvoerezh armerzhel, a ziempadur kevredigezhel hag a arallekadur sevenadurel. N'eus ket tu evelkent da renkañ Breizh pe Iwerzhon e-touez broioù an Trede Bed, e-kichen Kuba pe Aljeria. Unan eus gwanderioù grevusañ an Trede Bed eo an diouer a zeskadurezh : en Afrika da skouer ne oar an darn vrasañ eus ar boblañs na lenn na skrivañ, ha skort-kenan e chom niver ar vezeion, an ijinourion hag an armerzhourion vorian. Live a deskadurezh, evit da houmañ bezañ roet en ur yezh estren, zo er c'hontrol uhel-tre en hor broioù. Ret eo gouzout da skouer ez eus, dre vil den, muioc'h a studierion en Iwerzhon eget e Bro-Saoz; ret eo gouzout ivez ez eo an departamant 29 unan eus ar re zesketañ e Frañs. N'emañ ket gant Breizhiz kennebeut ar skoilhoù bredel pe gevredadel a vir ouzh ar greantelaat e lec'h all : ar stadegoù a ziskouez ez eo tuet muioc'h ar Vrezhoned yaouank d'ober studioù skiantel ha nebeutoc'h a studioù lennegel eget ar C'hallaoued yaouank. Berr e chom evel just ar spered-embregañ ha kalz Breizhiz a glask labourat en amaezhiadurezh, se avat zo un heuliad da ziskar an armerzh brezhon. Mar deu ar fiziañs en-dro en dazont dre zieubidigezh ar vro, e vo moarvat hor c'henvroiz leun a intrudu (n'eus nemet sellout ouzh ar strivoù kalonek graet gant hon labour-

erion-douar abaoe 10 vloaz evit nevesaat o atantoù). Ar pezh a vank dimp eo e gwirionez ar c'hevala ha dreist-holl an tu da ren ur politikerezh armerzhel broadel, eleze ar galloud politikel en hon bro.

Ar galloud politikel o deus Iwerzhoniz abaoe tost pemont vloaz. Strivoù bras a reont evit degas d'o bro ar c'hevala estren, hag ar strivoù bras-se o deus kroget da zougen frouezh. Amañ evel just ez eus un arvar da vezañ trevadennet ent armerzhel gant ar c'hevala estren. Ret eo teurel pled ouzh an arvar-se. Japaniz o deus ijinet ul lezenn evit mirout ouzh an estrenion a berc'hennañ muioc'h eget 20 % eus ar c'hevrannoù er c'hevredadoù japanat. Diouzh e du e klask ar Gouarnamant iwerzhonat aozañ amprestoù hirdermen a-berzh-Stad war an nevid europat pe amerikan; arveret e vez ar c'hevala amprestet diouzh ezhommoù ar vro ha n'eo ket hervez lezennoù ar gopr. Klask a ra ivez ar Gouarnamant diorren an espern broadel ha stardañ war gresk ar bevezerezh. Emañ hiziv an espern e-tro 20 % eus ar c'henderc'h broadel kriz, ar pezh a zo ur feur dereat, kalz uheloc'h eget gwechall (e 1967, Stadoù-Unanet 17 %, Breizh-Veur 18 %, Frañs 21 %, Alamagn 25 %).

Ret eo diskar mojenn an emvastañ. Breizh n'eo ket un diriegezh ec'hon evel an Unaniezh Soviedel pe Sina ha ne vo morse evit kenderc'hañ hec'h-unan an holl vadoù he deus ezhomm he foblañs, nag ivez kavout enni hec'h-unan an holl gevala ret evit diorren. Skouer Kuba hag Israel a laka an dra-se anat. Levierion Guba a anzav o-unan n'o dije ket gallet derc'hel tri miz hep skoazell an Unaniezh Soviedel, - ar riez-mañ o prenañ digant Kuba kenderc'had e sukr hag o werzhañ dezhañ an tireoul hag ar madoù all en deus ezhomm bras anezho. Heñvedra evit Israel. N'eo ket gwall blijus an anadurezh-mañ; ret e vo ober diouti evelkent. Ne c'hell ket ur vro vihan evel Breizh sevel he greanterezh dindan goudor ar maltouterezh; ret-buhez eo dezhi enporzhiañ ur bern madoù hag evit o faeañ he deus ezhomm ezporzhiañ ur bern madoù all ivez. Dav eo d'ar broioù bihan en em arbennikaat war dachenoù 'zo hag enporzhiañ ar peurrest, - re ger e koustfe kenderc'hañ pep tra, rak re vihan eo o nevid. Dre an hevelep arbenn ne c'haller ket kemer Sina pe Japan evel skouerioù ha diskleriañ hor bo ezhomm a-raok pep tra eus uhelfornioù hag eus ur vetalouriezh ponner. Evit chom kevezus e rankfe seurt ijinerezh ponner kaout un neviderezh a 15 milion a dud pe muioc'h zoken, ha neuze e ve ret dimp ezporzhiañ an 80 % eus ar c'henderc'had. Ouzhpenn-se e koustfe re ger; an arbennigourion o deus jedet e oa ret postañ 150 lur er vetalouriezh ponner evit gallout kenderc'hañ 100 lur; evit kenderc'hañ 100 lur er gennadoù all, e ve a-walc'h postañ 35 lur da skouer en ijinerezh apotikel ha 45 lur en ijinerezh tredanel. Broioù bihan evel riezoù Lec'hlen, evel Belgia, evel an Izelvroioù pe c'hoazh Helvetia, o deus en em arbennikaet kalz ha deuet int a-benn da gevezañ ouzh ar broioù bras dre o c'henderc'husted uhel hag heberzhded o c'henderc'hadoù. Evel just, ezhomm bras o deus ar broioù bihan-se eus ar c'henwerzh etrevroadel ha drastus e ve dezho un enkadenn en o eskemmoù diavaez. Hogen tizhet o deus ur barr-bevañ uhel-tre hag ur

perzh oberiant a gemeront e buhez ar bed a-vremañ.

Evit distreiñ da gudenn ar c'hevala e ranker anzav hor bo ezhomm eus ar c'hevala estren ma ne fell ket dimp chom un dachennad a labour-douar. N'eus ket a-walc'h a gevala en hor bro evit un diorren herrek; ouzhpenn-se ez eur techet da bellaat an hentennoù-gwaskañ a voe arveret en Unaniezh Soviedel. Ne fell ket dimp treuzfurmiñ Breizh en ur c'hamp-bac'h. Kontañ a c'haller war an aergelc'h a entan a heulio an dieubidigezh ha war an aberzhioù a asanto dezho ar boblañs e-pad ur mare evit sevel ur riez arnevez.

En Iwerzhon n'eus ket bet eus an aergelc'h-se end-eeun en arbenn eus ar brezel-diabarzh en doa faezhet feiz ar bobl. Abaoe dek vloaz e klask ar Gouarnamant adkrouiñ un aergelc'h a feiz en dazont dre ar steuñv broadel dreist-holl. Lorc'hus e teu pep Iwerzhonad da vezañ gant degouezhadennoù ar steuñv hag araokadennoù ar c'henderc'h broadel. E miz du 1968 en deus an Ao. Sean LEMASS, an Tevezeg, digoret Bloavezh Broadel ar Genderc'husted : e-pad 12 miz e tle pep Iwerzhonad strivañ da vuanaat an araokadennoù armerzhel, da wellaat ar genderc'husted, da grouiñ gourc'hwelioù nevez, da c'hounit nevidoù-ezporzhiañ nevez ha da uhelaat ar barr-bevañ hollel. Dre ma vo gwelet buan an disoc'hoù e ray berzh seurt strivoù. Evit a sell ouzh hor bro, arabat e vo kontañ re war entan Breizhiz evelkent evit diorren an armerzh. Ma ne vez ket a zisoc'hoù fetis a-benn un nebeut bloavezhioù e kavo gwell Breizhiz divroañ d'al lec'hioù ma vo fetisoc'h ar goprou hag uheloc'h ar barr-bevañ. Ret-groñs e vo neuze d'al levierzh brezhon ober berzh war an dachenn armerzhel.

Berzh a ra al levierzh iwerzhonat abaoe dek vloaz, hag ar riez a oa en argoll goude an eil Brezel-bed he deus kemeret ul lañs nevez. Emañ ar steuñv evit un darn vras el lusk nevez-se ha talvoudus e vo e studiañ. Unan eus an arbennoù all eo moarvat krouidigezh kevredadoù perc'hennet gant ar Stad hag o deus ur roll bras e buhez armerzhel ar vro. Iwerzhon eo ar riez kentañ da heul an Unaniezh Soviedel o vezañ stadperc'hennet an tredan e 1927. En holl ez eus 43 c'hevredad stadel evel Aer Lingus hag Aerlinter Eireann, ar c'hevredadoù nijerezh broadel... Dioutañ e-unan emañ pep degouezh, koulskoude tostoc'h da Vreizh e hañval Iwerzhon bezañ eget broioù all. Emañ heuliadoù ar c'hwitadenn armerzhel o steuziañ. Ret eo hetañ ma steuzfe ivez heuliadoù ar c'hwitadenn bolitikel, eleze ma ve dieubet ar c'hwec'h kontelezh dalc'het c'hoazh gant ar Saozon, ha heuliadoù c'hwitadenn an adkeltiekaat, - rak Padraig PEARSE, fuzuilhet gant ar Saozon e 1916, a skrive "n'eo ket a-walc'h da Iwerzhon bezañ dieub, ret eo dezhi bezañ gouezelek".

Eil displegadenn : Ur sell war armerzh Iwerzhon.

Skouer Iwerzhon a ziskouez ez eo hiroc'h ha diaesoc'h luskañ un argerzh-diorren ha lemel ar vestroniezh armerzhel eget kaout ar rezid

politikel. N'eo ket diouzhtu e c'haller diazezañ kreizennoù-diorren broadel ha terrif al liammoù kenwerzhel, moneizel h.a., a stage an armerzh ouzh hini ar vrobenn, dreist-holl pa vez ar gennadoù arnevez enbarzhet en armerzh ar vrobenn end-eeun.

Ken abred ha 1932 en doa ar Gouarnamant iwerzhonat klasket krouiñ un armerzh broadel o sevel ijinerezhioù nevez hag ouzh o gwarezifiñ enep ar c'hevezerezh estren. Ar politikerezh gwarezour en doa graet berzh e-doug eil hanterenn an 19^t kantved en Alamagn hag er Stadoù-Unanet, deuet da vezañ evel-se damanioù greantelaet; heuliet e voe an hevelep hent diwezhatoc'h gant U.R.S.S.. Met c'hwitet e voe warnañ en Iwerzhon dre ma oa re wan ha re strizh an nevid broadel. Anat eo an drouziwezh goude an eil Brezel-bed, rak p'edo holl armerzhioù Kornog ha Kreiz Europa o vont war-raok goude 1949-1950 e chome sac'h-et armerzh Iwerzhon. Skoet e oa gant un enkadenn e 1956-1958 tra ma kreske an dilabour (8,6 % eus ar boblañs-labour e 1957) hag an divroerezh (60 000 divroer e 1957, an niver uhelañ abaoe 1920).

Setu perak en deus ar Gouarnamant, dindan renerezh Eamonn DE VALERA ha Sean LEMASS, dibabet e 1958 ur politikerezh disheñvel rik : digeriñ armerzh Iwerzhon war an nevidoù diavaez ha greantelaat ar vro gant harp ar c'hevalaoù estren.

Anat eo en deus graet berzh ar politikerezh nevez betek-henn : kresk keitat ar c'henderc'h broadel zo savet da 4 % dre vloaz, daoust ma chom Iwerzhon warlerc'hiet e-keñver riezoù Kornog Europa; ul lamm war-raok en deus graet ar greanterezh, daoust ma chom c'hoazh ar gounezerezh an obererezh pennañ (1/3 eus ar boblañs-labour, 1/4 eus ar C'henderc'h Broadel Kriz, 60 % eus an ezporzhiadoù).

Diazezet ez eus bet 275 embregerezh nevez gant kevalaoù estren postet enno etre 1958 ha 1967 (62 anezho krouet e 1967). Ar Gouarnamant a ginnig spletoù a bep seurt evit dedennañ ar c'hevalaoù estren; dont a reont eus Breizh-Veur (40 %), Alamagn (20 %), ar Stadoù-Unanet (16 %), an Izelvroioù (5 %), eus Frañs zoken. Un darn vras eus an embregerezhioù nevez a werzh o c'henderc'had en nevid breizhveurat. Tric'hementet eo bet evel-se an ezporzhiadoù eus 1958 da 1965.

Enañ Iwerzhon o vont war-du un armerzh a vevezerezh, ha biskoazh ne oa bet ken strujus; evit ar wech kentañ he deus ar boblañs hollet ehanet a zigreskiñ : 2 818 000 annezad e 1961, 2 880 752 e 1966.

Met skoilhoù ha gwanderioù a sav diouz ar politikerezh nevez; ret eo anzav da gentañ ne vez ket krouet gourc'hwelioù niverus a-walc'h evit an dud yaouank a zeu e nevid al labour nag evit ar gouerion rediet da guitaat o atantoù dindan wered an arnevesaat; divroañ a ra well-wazh etre 20 ha 25 000 den bep bloaz. Donaat a ra ivez an diforc'hioù etre rannbarzhioù paour ha gounezel ar C'hornog ha rannbarzhioù pinvidikoc'h ar Reter, an darn vrasañ eus an embregerezhioù nevez o vezañ adeiladet e rannbarzh Dulenn.

Ar gudenn c'hrevusañ avat zo hini an darempredoù gant Breizh-Veur; rak dre arbennoù douaroniezhel met dreist-holl istorel, e chom stag armerzh Iwerzhon ouzh hini Breizh-Veur. An 3/4 eus an ezporzhiadoù a ya da Vreizh-Veur hag an 1/2 eus an enporzhiadoù a zeu eus

Breizh-Veur. E miz kerzu 1965 ez eus bet sinet un emglev kenwerzhel (Free Trade Agreement) dezhañ da bal krouiñ ur c'henvarc'had gant Breizh-Veur. Izelaet e vez tamm-ha-tamm an telloù-maltouterezh betek ma ne vo ket mui anezho e 1975. Evit ar Gouarnamant iwerzhonat ne oa an emglev-mañ nemet ur pazenn, rak pal gwirion al levierion oa emezelañ er C'henvarc'had Europat. Tabut zo bet en Iwerzhon a-zivout disoc'hoù an emglev gant Breizh-Veur; ul lodenn eus ar vroadelourion o deus en em ziskleriet a-enep, ar strollad Sinn Féin da skouer (1), - pouezañ a reont war riskloù ar c'hlaoustre kemeret gant ar Gouarnamant e-keñver rezid armerzhel ar vro.

Kalz a soñj e vefe drastus emezelañ er C'henvarc'had, rak kevezerezh an embregerezhioù bras a zegasfe dilabour ha rivin, o vezañ ma ne ve ket an embregerezhioù a vent vihan pe etre, ar re niverusañ en Iwerzhon, evit herzel ouzh ar c'hevezerezh-se (2).

Ur riskl grevusoc'h c'hoazh a zeufe diouzh un unvaniezh armerzhel gant Breizh-Veur pa ve dieub a-grenn, n'eo ket hepken monedoneoù an dud hag ar c'hevalaoù, met ivez ar marc'hadouerezhioù : e teufe armerzh Breizh-Veur da vestroniañ adarre armerzh Iwerzhon.

Roy JOHNSTON a gav dezhañ ez eo doareet ar prantad 1957-1967 gant an distro d'an "unvaniezh armerzhel" (economic unionism) hag ijinañ a ra zoken ar ger "neo-unionist" (nevezunanelour) evit termenañ ar strolladoù politikel a soñj e c'hell ur vroad diorren gant dedennerezh ar postadurioù estren e framm ur c'henvarc'had frankizour (3).

Degas a ra da goun ez eo bet distrujet ijinerezhioù henvoazel Iwerzhon e derou an 19^t kantved p'edo unanet Iwerzhon gant Bro-Saoz. Ne c'hallfe ar Stad enebañ ouzh ar sujidigezh-se nemet dre grouiñ ur Steuñv efedus, reoliñ ar c'henwerzh diavaez ha monedone ar c'hevalaoù, reiñ muioc'h a lec'h d'ar gennad foran; panave se e c'hallfe an dieubidigezh politikel aesaat ar vestroniezh armerzhel. Ar yezh a c'hallfe ivez talvezout da "wareziñ" an armerzh; rak Iwerzhon saoznekaet a ve aesoc'h da enbarzhiñ en ur c'henvarc'had breizhveurat (4). Aesoc'h e ve stourm e-barzh ar C'henvarc'had Europat ouzh gwered-mestroniañ an armerzh saoz, met riskloù an enbarzhadur armerzhel a chomfe.

N'en doa ket marteze ar gouarnamant iwerzhonat hent all digor dirazañ e 1957-1958 e-maez an hini en deus dibabet, hini an diglozadur war an nevidoù estren hag ar galv d'ar c'hevalaoù estren. Berzh en deus graet ar politikerezh nevez betek-henn, met daoust hag e c'hall al levierion luskañ an argerzh-diorren war-du krouidigezh un armerzh broadel gwirion ha chom hep kouezhañ dindan mestroniezh an armerzh saoz ?

(1) Sl. A-enep an emezelañ d'ar C'henvarc'had (Diskleriadur Sinn-Féin díwar-benn ar Gumuniezh Armerzhel Europat), Al Liamm 120 /121 1967.

(2) Lenn da skouer Anthony COUGHLAN, No to the E.E.C., in Maintaining a National Identity, Bloazlevr ar C'hevre Keltiek 1968.

(3) Roy JOHNSTON, The Lesson of the Irish Question, in Celtic Advance in the Atomic Age, Bloazlevr ar C'hevre Keltiek 1967.

(4) Alan HEUSSAFF, Bulwarks of Political Freedom, Bloazlevr ar C'hevre Keltiek 1966.

A N E M S A V H A G A R V R O (1 9)

KEMENNADENN STROLL-LEVIAÑ E.S.B.

Klozadur prantad ar frammañ politikel. Dezrann daou zarvoud.

Da gentañ e tegasomp un nebeut termenadurioù en-dro.

Termenadur nemetañ an Emsav zo bezañ framm dispac'hel brezhon. Roll ar framm dispac'hel brezhon zo distrujañ ar framm gall e Breizh ha kemer e lec'h.

Gant nerzh e tiskuliomp faosted an termenadur a ra eus an Emsav ur "strollad politikel". Ur strollad politikel zo e bal kemer ar galloud politikel. Ar galloud politikel brezhon n'eo na da gemer na da reiñ, met da grouiñ, ha n'eus nemet ur framm dispac'hel evit e grouiñ. Ur strollad politikel e Breizh hiziv ne c'hell bezañ nemet ur strollad gall.

Ar framm dispac'hel brezhon hepken a ra politikerezh brezhon. Ar strolladoù a laka warno ar skritell "strollad politikel brezhon" zo aozadurioù ampolitikel o labourat dindan ar galloud gall da vreinañ ar Stad c'hall ha da ober Gallaoued fall eus tud Vreizh. Ar framm dispac'hel a labour da grouiñ ar galloud politikel brezhon, da sevel ar Stad vrezhon ha d'ober Brezhoned eus tud Vreizh.

Termenet eo prantad frammañ politikel E.S.B. dre ar sevenadennoù a ra e glozadur :

- kevan eo ar gelennadurezh (1); drezi e c'hell hiviziken pep emsaver reiñ ar respont emsavel da gement goulenn graet gant Breizhiz pe estrenion;
- en e blom emañ ar frammadur politikel; betek an hañv 1969 e oa diazezet E.S.B. evel ur framm kefridiadel ma kave lec'h aozadurioù politikel, - an Dael, o c'hoari roll ul levrierezh-stroll, a oa dreist-holl ur benveg-imbourc'h da brientiñ ar frammadur politikel. Bremañ ez eo diazezet Emsav Stadel Breizh evel framm politikel; dasparzhet kempouez emañ ennañ an arc'hwelioù kefridiadel hag an arc'hwelioù politikel er ster strizh.

An emsaverion, e piau d'o armoù damkanel, harpet ouzh ur framm start, a grog gant obererezh kentañ ar prantad nevez, gant an ober foran.

o o o

Merket eo bet dibenn ar prantad frammañ politikel gant daou

zarvoud a zle bezañ dezrannet : diskarzh un ezel, kuitadur izili o nac'h disoc'hoù ar prantad frammañ politikel.

Un ezel anvek eo an hini a zo bet pedet da guitaat E.S.B.. Pouezus eo ar roll a c'hoarias en Emsav diouzhtu goude an eil Brezel-bed. Pa na chome eus an Eil Emsav nemet dismantrou, e voe eñ unan eus ar mouezhioù a savas evit embann gwirioù Breizh da vezañ dieub ha dlead Breizhiz da brientiñ o Stad vroadel. Un taol kalonek e voe, a dalvezas d'e aozer heskinerezh digor ha kuzh a-berzh ar galloud gall. An taol kalonek-se a laka anv Youenn OLIER en Istor Breizh. Un diougan e voe d'ar framm dispac'hel brezhon a zlee diwanañ ugent vloaz goude. Evel diougan hag evel raklusk e kemer an div gelaouenn An Avel, Avel an Trec'h o lec'h en argerzh dispac'hel brezhon.

An diouganer avat n'eo ket dre ret severer an diougan, - ned eo zoken nepred severer an diougan mar seller ouzh dibun an Istor. Hep mont pell e kavomp skouer vrudet Tangi MALMANCHE a voe diouganer an adsav yezhel ha lennegel, hogen a chomas estren, eneber zoken, da severerion e ziougan, tud Walarn. Fazi diazezerion E.S.B. a voe dic'houzout an dra anat-se, ha krediñ e ranke diouganer an Trede Emsav c'hoari ur roll severer en Emsav-se.

E 1947 en doa Youenn OLIER empenn un aozadur politikel, Emsav Pobl Vreizh, a varvas kent bezañ ganet. Da heul en em dennas el lennegezh hag er skridoù politikel. Un deiz a zeu e vo embannet un dezrannadur eus skridoù politikel An Avel, Avel an Trec'h, ha diskouezet ez eus etrezo hag ar politikerezh an hevelep keñver hag etre ar skridvarnerezh hag al lennegezh wirion. Un darvoudvarnerezh int, met e nep keñver n'int an darvoudaozerezh ez eo ar politikerezh. Diskouezet e vo ivez penaos ned eo ar pennadoù savet gant Youenn OLIER a-c'houde 1947, ouzhpenn an hevelep darvoudvarnerezh, nemet un adlavaradur digemm eus e dezennoù a 1945-1947. Kenderc'hel a ra da zeskrivañ ar pezh a dremen diouzh ur savboent diflach, da lojañ an darvoudoù nevez en ur reizhiad savet ur wech da vat. Anavezet-mat eo seurt barnerezh a-ziavaez evel azon an dic'halloud da gemer perzh oberiant, politikel, en darvoudoù. Kenkoulz-all, etre 1947 ha 1967, ne glaskas ar skrivagner luskañ e nep doare un ober politikel fetis. Bewech ma veneg un ober politikel, en en meneg en un dazont dispis, hep diskouezet an disterañ preder gant an aozadur fetis evit e gas da benn. Er c'hontrol, bep ma tremen ar bloavezhioù, e hañval an aozer pellaat mui-ouzh-mui diouzh mennoz an ober ha plediñ muioc'h gant darvoudoù etrevroadel, gall pe ledemsavel eget gant an Emsav stadel da lakaat en e blom. Fazi diazezerion E.S.B. a voe enta krediñ e c'hallent gortoz un obererezh politikel digant un den n'en doa ket paouezet a bellaat diouzh an ober politikel abaoe ugent vloaz.

Hag, e gwir, en aozadur ebet eus ar framm ne c'hoarias Youenn OLIER ur roll diazezer na zoken ur roll lusker : nag e S.A.D.E.D., nag e K.D., nag en Emsav, nag en aozadurioù a briente ar frammadur politikel. Kas a reas e labour kelenner e S.A.D.E.D. evel ur c'hefr-

idiad ordinal, met n'eo ket evel ur gwastadour. Ul lec'h ken sioul-all a zalc'has en aozadurioù politikel, - ul lec'h a enor. Ne voe nag ar c'hrouer nag al lusker a spie e geneiled ma ve. Nepred ne veizas ar politikerezh brezhon evel politikerezh ur framm dispac'hel. En enep, e talc'has da welout en E.S.B. un danvez strollad politikel, heklev ar P.N.B., tonket da gevezañ ouzh ar M.O.B., U.D.B. pe Sav Breizh. An emzalc'h gwariadek-se eo an arbenn damkanel eus an disentez diskarzhañ douget ouzh Youenn OLIER. Dindan e levezon linkrus e kouezhas danvez emsaverion en hevelep gwariadur : distignañ a reas enno ar youl d'en em stummañ; ar gwel eus hent kompez ur strollad politikel frankizour o lakaas da ereziñ ouzh rañvedoù serzh ar framm dispac'hel ha da skoilhañ labour an aozadurioù politikel.

Kenlabour Youenn OLIER gant Emsav zo ivez da vezañ dezrannet. Evel a ouzer, en niverennoù kentañ e voe roet dezhañ al lec'h a enor, an titl a Bennskrivagner. Goude un nebeut niverennoù avat e c'houlennas e-unan ma ve tennet e anv diwar ar bajenn gentañ, peogwir n'eo ket eñ a rae labour ar Pennskrivagner. E gwir, krouerion Emsav, diwar an derou a varnas e bennadoù evel diembannadus. Krog e oant-int da luskañ un daelerezh diwar an dachenn obererezh dalc'het gant ar framm, ar pezh a emlege ne oant evit plediñ nemet gant an traoù a c'hallent oberiañ warno; ar pezh a emlege ivez e oa an ober dispac'hel o ren. Youenn OLIER, evitañ, a gendalc'he da varn pep tra diouzh an hevelep savboent treamzerel hag e 1945, ha da ginnig selledoù hollek hep darempred eeun gant al labour pemdeziek. An Emsav oberiant o vezañ lakaet gantañ da zerc'huiñ en dazont, edo ar Stad vrezhon amzeriet en un dreistdazont mojennek. Ha koulskoude e fizie an aozer er Stad vojennek-se an emell da dreuzfurmiñ ar vro, d'he brezhonekaat, da unvaniñ ar bobl, da ziorren an armerzh, h.a.. Nepred avat ne ziskouez preder da c'houzout a belec'h e teufe d'ar Stad an nerzh evit kas da benn an trevelloù-se. Un tun ouzhpenn n'eo ken keal ar Stad en empennadennoù Youenn OLIER, - ha war un dro frouezh ur c'helc'hpoellata : ar Stad o vezañ piaouer an nerzh dre dermenadur, ganti e vo kavet an nerzh a vank d'an Emsav, met penaos e oufe an Emsav kaout digant ar Stad an nerzh en deus ezhomm evit he sevel end-eeun ? E nep lec'h ne hañval ar skrivagner soursial gant ar pennad hent a zo anezhañ krouidigezh ar Stad vrezhon, pennad hent nad eo netra estreget an Emsav e-unan. E nep lec'h ne hañval gwelout al labour ramzel a zo dirazomp, luskañ e pobl Vreizh an argerzh dispac'hel. E nep lec'h ne anavez ster al labour renet gant ar framm dispac'hel brezhon abaoe bloavezhioù.

Tonket e oa da guitaat ar framm, ha dre ret diwar ma ve goulennet digant pep ezel un ober fetis e-touez ar boblañs. Rak an ober fetis-se a denn e ster eus ar gelennadurezh dispac'hel diazezet war an daelerezh renet abaoe seizh vloaz e diabarzh ar framm etre par damkanel ha par embregel, - hag an daelerezh-se end-eeun oa chomet estren a-grenn da Youenn OLIER. Preder an dispac'her zo gant damkaniezh ar pezh a ra ha gant embregerezh ar pezh a soñj,

e vennozioù o kas war-raok an darvoudoù hag an darvoudoù o kas war-raok e vennozioù. Ne vez lec'h ebet en ober dispac'hel evit ar savboentoù diflach nag evit an darvoudvarnerezh hep krap war an darvoudoù.

Aze emañ ster politikel an disentez diskarzhañ douget ouzh Youenn OLIER. Moarvat ez eo bet kaset da benn an diviz politikel-se e stumm un disentez a genurzh : lakaet eo bet er-maez dre an arbenn embregel m'edo o tuta dre guzh e-touez izili ha danvez izili E.S.B. evit sevel ur "strollad politikel". Met mar en deus torret grevus ar genurzh ez eo dres peogwir ne oa ar framm evitañ netra muioc'h eget ul lec'h-emgav ma c'halle pep hini degas e albac'henn, hag ul lec'h-gortoz ma c'halle pep hini aozañ ar c'hoari a gare.

An eil darvoud a verkas dibenn ar prantad frammañ politikel e voe an nac'hidigezh gant "izili" 'zo eus disoc'hoù ar prantad-se end-eeun.

Daveiñ ne raimp ken da Gemennadenn Kengor an Dael evit Breud-
où Mezheven 1969 (2). Ganti ez eus un dezrann spis eus stad E.S.B. en nevez-amzer 1969. Ur fazi all a rankomp diskleriañ eo an hini a voe, en diskar-amzer 1968, savelañ kelligoù hep kemer ur preder emsavel gant dasparzh an dud etrezo. Kelligoù 'zo ne oa enno den ebet o vezañ sammet istoregezh an Emsav. Deskrivet eo bet heul-
iadoù ar fazi : kent pell he devoe pep kellig he stuz hag he spered, "he foell dezhi hec'h-unan, hag ar poell-se en doa nebeut da welout gant poell an Emsav"; ne veze ket embreget an dezrannañ emsavel ha kollet e veze a-nebeudoù skiant eus poellelezh an Emsav : an emouiziegezh a leze al lec'h gant an emdarzhegezh dirollañ; izili kelligoù 'zo a zileze o stummadur ha war un dro o gourc'hwelioù en aozadurioù-kreiz, - uheloc'h er gemennadenn-
mañ e venegomp an devoudoù-se c'hoazh en ur zezrannañ unan eus an elfennoù-luskañ anezho. Seurt dastorradur er stroll hag er speredoù a chomas difrouezh a-grenn : eus ar gellig-mañ a embanne plediñ gant an armerzh ne zeuas ket an disterañ labour armerzh-
ouriezh, - en enep, heñchet e voe an deskidi he heulie etrezek an armerzhelouriezh; ar gellig-hont, a oa sañset o ren bruderezh er c'helc'hioù ledemsavel, ne zisoc'has gant netra nemet dastum ul liv ledemsavel hec'h-unan. Ouzhpenn-se, seul vui ma pellae ar c'helligoù-se diouzh E.S.B., seul vuioc'h a emrenerezh a c'houl-
ennent, - an emrenerezh-se o vezañ kemer frankiz an oberoù hag ar mennoziù hep sammañ an dlead d'o dezrannañ e-keñver poellelezh an Emsav; ha prest e oant d'en em zizober, mar beze ret, diouzh an izili o doa krouet aozadurioù E.S.B. hag o doa sammet betek neuze buhez ha kresk ar framm.

Ar re-mañ a verzas ar fazi e oa bet a) lezel ar c'helligoù d'en em stummañ er-maez a bep poell emsavel b) reiñ an emell en divizoù politikel da dud divarrek c'hoazh dre ziouer a stummadur da sammañ atebegzh wirion ebet en Emsav.

En o raktres e oa bet sellet ar c'helligoù evel un amplegad da savidigezh al levierzh politikel en E.S.B., ar galloud hiniennel harpet warno en trobarzh o tont da gempouezañ ar galloud-kreiz. Anat eo e teue dic'hallus sevel nep levierzh politikel dre berzh emdroadur diheboell ar c'helligoù. Penaos kaout emglev war ar framm gant tud o doa paouezet d'e anaout evel framm ? Diempradur ar c'helligoù a roe tro da albac'henn an Emsav-"strollad politikel", d'ar gwariadur strolladelour, da reuziañ hogos diharz.

Mallus oa tennañ E.S.B. eus ar saviad argollus ma edo. Treset e voe daou gammed : da gentañ, dezrannañ ar saviad, ha se a voe graet, dre Gemennadenn Kengor an Dael evit Breudoù Mezheven 1969 pergen; d'an eil, dre gemer sol war an dezrannadur-se, lakaat E.S.B. en e boell en-dro; ha se a voe graet dre an hent-mañ :

1) Atebeion devoudel E.S.B., - krouerion ha blenierion e aozadurioù, - en em zisklerias evel levierzh gwirel ar framm. Emouezkaer e oant ouzh an taol-nerzh a gasent aze, ha n'int ket mennet d'e guzhat na d'e dreuzwiskañ. Mennet int d'e sammañ betek e heuliadoù diwezhañ.

2) Diazezañ E.S.B. evel framm politikel.

3) Derc'hel en o nerzh kement reizhenn mouezhiet gant an Dael betek neuze, - ar framm kent, kefridiadel dreist-holl, o kavout e lec'h e diabarzh ar framm politikel.

4) Adaozañ ar c'helligoù hervez pennaennoù an ober dispac'hel o deus renet war diazevadur ar framm politikel, - kreizennadur an divizout hag an damkanerezh, digreizennadur an erounit hag an embregerezh pergen.

An disenteziou-mañ a ro klozadur d'ar prantad frammañ politikel renet gant aozadurioù E.S.B. abaoe an hañv 1966. Ent dibarekoc'h ne reont nemet unan gant Kemennadenn Kengor an Dael evit Breudoù Mezheven 1969 : ar Gemennadenn a ergerzhas an enkadenn, an disenteziou a gas E.S.B. en tu all d'an torrod a ginnige e zispenn.

"Izili"'zo n'o deus ket degemeret an disenteziou-se, ar re end-eeun n'o doa dalc'het kont ebet eus ar Gemennadenn. E gwir, er-maez eus ar framm e oant aet pellik 'zo, lakaet e vent bet e-barzh biskbazz, hag ar pezh a dremene e-barzh n'en doa ket nemeur a heklev ken en o buhez. Hini ebet eus an "izili" o deus kuitaet E.S.B. en hañv 1969 n'en doa savet e vouezh da vreutaat ar Gemennadenn en he mare. Unan a bevar : pe n'o doa nag he selaouet nag he lennet ha pell diouzh E.S.B. edont endeo; pe n'o doa ket he c'homprenet hag o lec'h n'edo ket e-touez an izili met e-touez an deskidi; pe he c'homprenet o doa ha ne oant ket a-du ganti hag en ur chom mut e tibabent endeo kuitaat E.S.B.; pe edont a-du ganti hag o muderezh, o digasted pe o ezvezañs a broue a-walc'h

an nebeud a breder a gemerent da zienkañ an Emsav.

Penaos meizañ ersav an "izili"-se ? Deuet oant da zianaout istor ar framm ha da sellout outañ evel ouzh ur strollad politikel. An touell ma oant en em lakaet a vire outo a veizañ netra e buhez politikel an Emsav : o ersavioù digempoell ouzh an darvoudoù abaoe derou 1969, o digasted ouzh an argoll ma voe E.S.B. en nevez-amzer 1969, o divarc'hadur p'o deus ranket kuitaat E.S. B. a verk an hevelep gwariadur hag a c'houlenn an hevelep remed : merzout ned a ket E.S.B. en-dro evel ur strollad politikel, met evel ur framm dispac'hel.

Penaos meizañ ar fazi ez eo bet degemerout er framm tud na oant ket emsaverion ? An Emsav n'en devez ar binvioù ergorel da varn nemet war an dachenn ma'z eo frammet. Keit ha ma c'hoarvezas an Emsav eus ur framm deskadurezh hepken, e selled ouzh kement skoliad evel un danvez emsaver, ouzh kement kefridiad evel un emsaver. Dre framm an deskadurezh ne veze tu da zezrannañ ar gwariadurioù nemet pa dennent war-eeun d'an deskadurezh. Hep frammadur politikel ne oad ket evit dezrannañ ar fazioù hag ar gwariadurioù politikel. Kemeromp da skouer an digempouez a voe diskuliet e dasparzh al labour e S.A.D.E.D. e 1967, e K.D. e 1968; dre vinvioù ar framm deskadurezh e oa tu hepken da c'houzout piv a oa kefridiad aketus ha piv na oa ket; ne oa ket tu avat da vont pelloc'h na da ergorelaat orin an digempouez pa oa politikel. Ar strivoù da reizhañ an digempouez, o tont a-berzh levierion ar framm deskadurezh, ne c'hallent disoc'hañ hep framm politikel. Edo aze E.S.B. en ur c'helc'h-bac'h, rak an derou a framm en doa krouet un diabarzh hag un diavaez; met an diouer a framm politikel a leze diresis an harzoù etre an diabarzh hag an diavaez, ken ma chome dic'hallus diskoulmañ kudenn an ezeladur, ha, da heul, kudenn al levierezh, alc'houez savidigezh ar framm politikel. Diempradur ar c'helligoù, ar gwariadur strolladelour zo da savlec'hiañ en argerzh amploc'h-se. An disentezioù kemeret en hañv-mañ o deus torret ar c'helc'h-bac'h : savelet eo bet al levierezh, termenet spis an harzoù etre diabarzh ha diavaez, diskoulmet kudenn an ezeladur, diazezet E.S.B. evel framm politikel, - pep tra war un dro, ne c'halle ket bezañ e doare all. War un dro ivez, un niver a izili a-gent zo en em gavet er-maez; an devoud-se zo ar brouenn ez eo hiviziken resis an harzoù ha fraezh divizoù an ezeladur.

Kriz eo bet kavet darvoudoù an hañv. Renet int bet gant E.S. B. hag ul lod int eus e istor. E.S.B. a samm ar fazioù en deus graet, eleze o dezrannañ hag o reizhañ. Dlead ar re a zo aet er-maez anezhañ eo ober kemend-all, ha se dre gemer anaoudegezh eus poellelezh an Emsav. Er priz-se e chom e zor digor dezho.

o o o

An daou zarvoud-mañ n'int ket darvoudoù nevez en Trede Emsav.

Er bloavezhioù pemont e rankas an emsaverion stourm e-pad hir amzer evit difenn ar yezh peurunvan, an elfenn bolitikel nemeti a chome e Breizh, enep al luskadoù a venne peurzibolitikaat ar "stourm sevenadurel". Disteurel a rejont eneberion ar yezh peurunvan en tu all da harzoù a zeuas da vezañ harzoù gwirion an Emsav. Ha trec'h ar yezh peurunvan a voe kentañ trec'h bras an Trede Emsav. An eil trec'h bras a voe saveladur an Emsav evel framm dispac'hel. Dibaot e voe e 1962 an dud a gomprenas an eil-pennadur degaset gant S.A.D.E.D., pa lakae da dremen dre ar framm an elfenn bolitikel a oa el liammoù a vignoniezh etre ar vrogarourion, da lavarout eo pa dreuzfurme ar vrogarouriezh vrezhon en un nerzh politikel. Ken hir ha m'o doa emgannet diwallourion ar yezh peurunvan ez emgannas S.A.D.E.D.: etre 1962 ha 1967 en em droc'has diouzh kement luskad, e troc'has dioutañ kement ezel a nac'he meizañ an Emsav evel framm dispac'hel (3). Dre henn ober e kasas war-raok frammadur dispac'hel ar vro boulc'het er bloavezhioù pemont, e startaas an harzoù diazezet gant e ziaraogerion hag e roas dezho talvoudegezh un talbenn-argadiñ. Kresk ar framm, diwanadur an aozadurioù politikel, erziwezh saveladur E.S.B. evel framm politikel a ro hiviziken d'an Emsav an tu da luskañ an argerzh dispac'hel er vro. Ar framm, al ledemsav hag an harzoù etrezo o deus bremañ ur roll resis en daelerezh-dieubiñ (4). Setu perak e c'haller reiñ o ster emsavel da zarvoudoù evel re an hañv tremenet. An dud a zo aet er-maez eus E.S.B. a gil rak politikadur ar framm, evel ma kile broadelourion 'zo e 1962 rak frammadur an Emsav ha ma kile brogarourion 'zo e 1950 rak politikadur ar yezh. Roll an Emsav avat zo politikaat ar vro, hag ar politikerezh nemetañ da ren er vro zo politikerezh ur framm dispac'hel. Nep luskad dibolitikel pe ampolitikel, nep "strollad politikel" e Breizh zo un embregadenn-dibolitikaat o sammañ dre ret roll ul ledemsav. Kenderc'hel a ray an Emsav da ziskuliañ kement embregadenn-dibolitikaat en-dro dezhañ hag ennañ e-unan.

(1) Sl. Unvanadur an istoregezh, Emsav 32/231.

(2) Sl. Emsav 31/206.

(3) Sl. Al luskadoù politikel e Breizh e diwezh 1966, Emsav 1/6; "Emsav" ha "Kendalc'h", Emsav 4/86; Hent ar sokialouriezh e Breizh, Emsav 7/172; "Kuzul ar Brezhoneg" hag an Emsav, Emsav 12/324; Kemennadenn a-berzh Skourr an Deskadurezh vroadel, Emsav 17/148.

(4) Sl. Lec'h al ledemsav en daelerezh-dieubiñ, Emsav 31/195.

EMVR-98

LIZHEROU

"Aon am eus o devo un niver a dud kalz poan o kompren petra a

dalvez unvaniñ an istoregezh [sl. Emsav 32/231]. Pa lavarar unvaniñ ar yezh, ez eo sklaer diouzhtu; an dud a soñj en doare-skrivañ, er yezhadur, er geriadur. Pa lavarar avat unvaniñ an istoregezh, ez eo kalz tennoc'h diverzout petra zo danvez an unvaniñ; un danvez amzeriek eo, na c'hell ket bezañ kemeret da ergorad, - ar perag zo bet displeget e-barzh Tonkad 65 p. 10-11 : 'E gerioù all, an amzer ne c'hellomp ket ergorañ outi evel ma ergoromp ouzh an egor; ne c'hellomp savelañ an amzer evel amzer nemet en hon dangorelezh, eleze dre ar buhezañ. Ne c'hell morse ar reizh kantvout ur framm amzeriek ennañ e-unan; dre-se ne c'haller morse en em dennañ eus an Istor evit ergorañ outañ'. E gwir, ne welan ket an doare eeun da zisplegañ unvanadur an istoregezh. Marteze n'eus doare eeun ebet : o vezañ ma ne c'haller ket ergorañ war-eeun ouzh an danvez unvanet, ez omp rediet d'e anaout a-dreuz d'an troc'hoù a reomp ennañ. Diglok eo pep troc'h, met aes eo da veizañ an dalc'had anezhañ, - arabat eo neuze kemer an troc'h a studier evit an istoregezh a-bezh ha sellout ar poell a verzer ennañ evel poell ar furm amzeriek hollel. Un troc'h hon eus graet e par Gwalarn daou vloaz 'zo. Un troc'h a reomp bremañ e par Breiz Atao. An troc'h diwezhañ-mañ, evel pep troc'h nevez, a leugn an istoregezh a-bezh gant sterioù nevez, hag an holl droc'hoù kent en em gav adsteriet gantañ. ()

"Ur poent all, a ro da gompren petra eo unvanadur an istoregezh. Betek hevlene e chome digevan () ar gelennadurezh. Betek hevlene n'hor boa en hon c'herz nemet tammou a gelennadurezh; mankout a rae tammou a-bouez evit ma teufe d'ur furm gevan ha kempoell. Setu perak ez eo roet da gevatal unvanadur an istoregezh hag unvanadur ar gelennadurezh. Se a dalvez kement-mañ : a) holl elfennoù ar gelennadurezh a ra etrezo un unvez organek kevan ha kempoell b) ar gelennadurezh () a ra gant istoregezh hollel Breizh un unvez kevan ha kempoell : ar benveg eo evit reiñ ster da gement darvoud tremenet, eleze da enframmañ kement danvez kevala istorek a zo e tremened ar bobl vrezhon (ha moarvat muioc'h eget houmañ) k) ar gelennadurezh a ra ar stern klok evit ren embregoù an daelerezh-dieubiñ.

"Evel just e chom bepred krefen da resisaat, dres evel ma'z eus chomet krefen yezh da resisaat goude unvanadur ar yezh. Met krefen eilel int, o vezañ ma vint embreget e diabarzh stern ha war sol an unvanadur hollek e-unan. Diwar vremañ ez eus un ober brezhon unvan evel ma'z eus ur brezhoneg unvan. Hag en hevelep doare m'he deus reizhiad an diseurtiezhoù rannyezhel lezet al lec'h gant ar frammad yezh reizh / fazioù, e lez ivez reizhiad an tezennoù personel disklotus al lec'h gant ar frammad kelennadurezh / gwariadurioù.

"Falc'huned zo bet evit lakaat en arvar unvanded ar yezh. Falc'huned zo hag a vo c'hoazh evit lakaat en arvar unvanded an istoregezh." (02 09 69)

EMVR-99

KEMENNADENN A-BERZH S.A.D.E.D.

Emvod hollek S.A.D.E.D. Pevare emvod hollek 1969 ar Strollad a vo dalc'het e Roazhon, d'an 2 a viz du.

EMVR-100

NOTENNOU POLITIKEL (8)

BEVENNADUR BELI AL LEVIERION

I. - PENNAENNOU AR BEVENNADUR : AR FRANKIZIOU FORAN

Diwar m'emañ rannet pep kevredigezh politikel etre levierion ha levidi ez eo natur e savfe tennderioù etre an daou rummad : techet eo an neb a vez o ren da astenn e c'halloud ha pa ve evit e ziogeliñ; al levidi, en o zu, o devez diegi o sentiñ nemet e kavfent poell, ha dreist-holl e santfent redi ouzh henn ober. Ar goulenn a reer zo enta : gant petore kempouez e tisoc'h ar c'henstourm etre dalc'h al levierion ha dizalc'h al levidi ? E gerioù all : petore bevennoù zo da veli al levierion ?

Liesseurt int. Eus an Natur e teuont gwechoù 'zo : beli diharz TAMERLAN a veze koulz ha dic'halloud kant lev diouzh e gêrbenn; en e gêrbenn hec'h-unan, pa zispac'he ar bobl, ne veze ket an trec'h bepred gant klezeier ha goafoù e soudarded. Gwechoù all e teuont eus ar spered : anavezet e voe rouaned a gave en o c'harantez ouzh ar reizhded hualoù a-walc'h da gabestrañ o angerzhioù mac'hom.

Ret eo lavarout ned eo ket an Natur evit gwareziñ ken ar pobloù ouzh o renerion hiziv an deiz : ar pellder, an torosennadur, nerzh korfel an dud ne gontont ket nemeur dirak an araezioù-kehentiñ ha -brezeliñ a zo bremañ e kerz ar Gouarnamantoù. A-du-rall, esparadennoù e chom bepred ar sent, ha n'eo ket gant sturiennoù ar vertuz e vez dalc'het war aloubusted ar veli, - gant reolennoù ar gwir ne lavaromp ket.

Div lodenn a vo en Notennoù-mañ : ul lodenn damkanel, o plediñ gant pennaennoù ar bevennadur, o tiskouez penaos e voe meizet kudenn ar bevennadur en istorvezh ha, war un dro, ar roll pouezus a c'hoarias meizadur ha difennerezh ar frankizioù foran; ul lodenn embregel,

o plediñ gant araezioù ar bevennadur.

PENNAENNOU AR BEVENNADUR : AR FRANKIZIOU FORAN

Ur mennoz arnevez eo bevennañ beli al levierion, da nebeutañ ar bevennañ a-berzh al levidi o-unan. Keit ha ma voe diazezet ar galloud politikel war an aotrouniezh speredel, ne veze degemeret ent wironiel nemet bevennadurioù a-berzh houmañ, ha n'o deveze al levidi gwir hiniennel ebet dreist da wirioù ar Geoded.

Ar gristeniezh eo a zegasas ar meizadur arnevez : dre reiñ d'an hinienn gwirioù trec'h da wirioù ar stroll, ez ensave war un dro gwir al levidi da reoliñ beli o levierion

Heuliad kempoell ar reverzhi-se e voe an disparti c'hoarvezet kantvedoù da c'houde etre galloud politikel ha galloud kravezel. Pa ziwanas ar riezoù arnevez, dizalc'h diouzh ar Babelezh, e fellas d'an Iliz merkañ ur pal d'o galloud, ha termenañ ar gwirioù divezel eus mab-den a oa dlead ar Stad anaout ha gwareziñ.

Gant teologourion ar Grennamzer e voe savelet keal al "lezennoù direizh" ha goveliet pennaenn an herzel ouzh ar gwaskerezh, a zo e diazez damkaniezh bevennadur ar veli bolitikel.

Ar bennaenn-se a dalvezas da eneberion an unpenniezhoù diharz-veli, ar Brotestanted c'hall hag ar Buritaned saoz pergen. En 18^t kantved e voe adkemeret gant ar Filozoferion, a erlec'hias un diazez naturelour ouzh he sol kravezel. Frouezh o labour a voe Diskleriadur Gwirioù an Den hag ar C'heodedour embannet e 1789 gant an dispac'herion c'hall. Ar skrid politikel-se a ensavadekae ar frankizioù foran en Europa, - e gwir, evit e sevel e kemeras e aozerion harp war an diskleriadurioù gwirioù embannet a-ziagent gant Stadoù amerikan 'zo.

A-hed an 19^t kantvede talvezas damkaniezh ar frankizioù foran da sol kelennadurezhel d'ar strolladoù frankizour en o stourm ouzh ar virourion.

En 20^t kantved, evel ma welimp, e c'hoarvez un emdroadur nevez : ar frankizioù ne vezont ket difennet ouzh ar Stad hepken, hag e degouezhioù 'zo e teu ar Stad hec'h-unan da gemer en he gwarez ar frankizioù lakaet en arvar gant ar galloud armerzhel prevez.

Ar frankizioù foran en 19^t kantved : ar frankiz-har zadur.

Dav eo da gentañ termenañ ar ger frankiz. "Kaout frankiz d'ober" un dra bennak a dalvez "kaout frank an hent evit ober" an dra-se.

Evel termen a wironiezh e verk ur galloud prevez anavezet gant ar galloud foran, - setu perak e lavarer : frankizioù foran, - eleze ur gwir : ar frankiz-kehentiñ da skouer zo ar gwir da veajiñ, da genskrivañ, h.a., frank a bep reolerezh a-berzh ar veli-Stad.

Diazezet eo keal gwirioniel ar frankiz war veizad trabedel ar rezid. Ar rezid zo ur perzh-diazeze eus mab-den na c'haller ket termenañ war-eeun; e savelañ a reer a) dre an nac'hañ, evel an dizalc'h diouzh ar redi, - met dispis e chom ar saveladur dre an nac'hañ, rak un den en e rezid ned a ket er-maez eus domani ar rediegezh evit kelo (1); b) dre an azonoù anezhañ, evel ar galloud-trehontiñ, ar galloud-krouiñ, an istoregezh, h.a..

Ar frankizioù zo an dremmoù politikel o wiskañ ar galloudoù-se. Alese o forc'hellegezh : hervez an degouezhioù e c'hell embregadur ur frankiz mont a-du gant pe a-enep d'ar rezid. Ar frankiz-eztaoliñ a c'hell bezañ ur frankiz-krouiñ pe ur frankiz-linkrañ hervez an arver graet anezhi. Ar frankiz-kenderc'hañ zo deuet da vezañ ur frankiz-vac'homañ en 19^t kantved, - ken ma kemerer zoken a berzh fall hiziv alies an termenoù frankizour ha frankizouriezh.

Frankizourion an 19^t kantved a veize ar politikerezh evel ur c'henstourm etre an hinienn hag ar gevredigezh. Asantiñ a raent d'ar Stad evel d'un droug ret : dav oa he gouzañv, hag he bevennañ strizh. "Ne levier ket hep nozout", ar bomm-se gant an dispac'her gall SAINT-JUST a gemerent da wir bater ha dioutañ e tennent ar c'hlozadurioù rekis.

Andonioù ar gelennadurezh frankizour

Teir andon a zeskriver d'ar gelennadurezh frankizour : un andon gravezel, un andon bolitikel, un andon armerzhel.

An andon gravezel : an divezouriezh.

Gwelet hon eus e oa an hevelep devouderezh d'an disrann etre ar galloudoù kravezel ha politikel ha da bennaenn bevennadur beli ar Stad. Ur Stad velegveliek n'he deus bevenn diavaez ebet. Ur Stad lik hepken a gav bevennoù diavaez dre berzh bezañs un aotrouniezh speredel a-dal dezhi.

Tu oa da soñjal e ve bet gwanaet pennaenn bevennadur ar veli da heul steuziadur an emskiant kravezel en Europa. Ar c'hontrol eo a c'hoarvezas, rak mar kilas betek ur poent an denelouriezh kristen, e tiwanas un denelouriezh poellelour da gemer he lec'h ha d'he harpañ war an dachenn-se. An divezouriezh poellelour a embannas, taeroc'h zoken eget an divezouriezh kristen, gwirioù mab-den evel

gwirvoudoù trabedel, savlec'hiet a-zioc'h d'ar Stad ha trec'h da wirioù ar Stad. Ar gwir divezel, anvet ivez "gwir naturel" (2), a chom andon ar gwir devoudel ha war un dro andon ar bevennadurioù anezhañ.

An andon bolitikel : ar mac'homerezh.

En 18^t kantved eo e voe ganet al luskad frankizour, e grez an diharzveli roueel, gant ar re a c'houzañve mac'homerezh moarvat, met dreist-holl gant ar re a oa armet evit stourm outañ : kefredourion, skrivagnerion ha prederourion, - ar Filozoferion. Re wasket oa ar gouerion hag ar bobl vunut evit empennañ stourm ebet.

Danzeet e voe an damkaniezhoù frankizour gant ar vourc'hizelezh kenwerzhour, greantour ha kefredour. Pinvidik oa ar renkad-se ha ne c'houzañve ket an dezvad izel a oa he hini : brientoù an noblañs, reizhennoù ar c'horfuniaderezh a oa dezhi kemend-all a hualoù da derriñ. Eviti, ar frankizour oa teurel diwarni reolerezh ar Stad.

Diskleriadur Gwirioù 1789, pell diouzh bezañ un empennadenn difetis a-berzh kelennadourion, a venne kent pep tra freuzañ droug-arverioù ar Renad Kozh hag enebañ ouzh oberoù resis tamallet d'ur Stad barnet mac'homus. Keal ar frankizioù foran a zinaoù, ent sklaer, diouzh ar stourm ouzh ar gwaskerezh a-berzh an ensavadurioù Stad hag al levierion.

En 19^t kantved e weler ur stourm heñvel, renet gant ar frankizourion, troet n'eo ket ken ouzh an diharzveli roueel, met ouzh gourdrouz ur Stad werinek soliet war bennaennoù stourmerion ar frankiz eus ar c'hantved a-raok.

An andon armerzhel : ar greanteladur.

En 19^t kantved e veze ereet frankizouriezh armerzhel ha frankizouriezh politikel. Lakadenn trec'hded an embregerezh prevez war oberoù ar Stad a ya da ziazez ar frankizouriezh armerzhel : al levierion n'o deus ket da emellout en armerzh.

Ar bevennadur-mañ n'en deus ket un dalvoudegezh trabedel evel an daou all, met unan bleustrek hag arverek. Hogen dre e liammoù gant an daou all e sachas warni ur meni trabedegezh, evel ma tiskouez Diskleriadur 1789 en e vellad 17 : ar gwir nemetañ diskleriet evel difreuzadus ha nevet eo ar gwir d'ar berc'hentiezh.

Ar frankizioù foran

Daou seurt frankizioù foran zo bet savelet, hervez ma tennont

da vuhez an hiniennoù pe d'ar vuhez kevredik.

Ar frankizioù hiniennel.

1) Frankizioù ar bersoned pe frankizioù keodedel, a zo anezho frankiz an annezañ ha disgwalleded an annez, frankiz an daremprediñ, ar c'hehentiñ, ar frankizioù tiegezhel (gwir da zimeziñ hep emell ar Stad, gwir da zesevel ar vugale) ha, dre vras, kement gwir o reiñ diogelroez d'an hinienn dirak ar veli stadel.

2) Frankizioù armerzhel, anezho ar gwir d'ar berc'hentiezh, d'ar frankembregerezh ha d'ar frankkevezerezh, frankiz ar c'henwerzh, frankiz amred ar c'henderc'hadoù (frankeskemm enriezel hag etrieriezel), frankiz ar prizioù hag ar goprou hervez savelennoù an nevid. E pep degouezh e vez sellet emell al levierion en armerzh evel un droug.

3) Ar frankiz-dezeviñ. Ar frankiz-dezeviñ zo war un dro ur frankiz hiniennel, ar gwir gant pep hini da varn an devoudoù diouzh e veno ha da eztaoliñ e varnoù; hag ur frankiz kevredik, rak an eztaoliñ zo un ober kevredigezhel. Aes eo kompren perak e vez gouzañvet gant al levierion an obererezhioù arzel ha lennegel pur buanoc'h eget an embannadurioù war danvezioù evel ar brederouriezh, ar politikerezh pe ar gravez.

Ar frankizioù kevredik.

Kement obererezh o tennañ d'ar vuhez kevredigezhel a sell a-dostoc'h ouzh an dachenn end-eeun ma embreg ar Stad he beli : setu perak e voe diaesoc'h gounit ar frankizioù kevredik ez eo frankiz ar wask, ar frankiz-emvodañ hag ar frankiz-kevrediñ, eget ar frankizioù hiniennel-strizh. En 19^t kantved eo e voe stourmet an taerañ evito. Gounezet e voe an emgann e daou brantad : da gentañ e vèze diframmet digant ar veli ar frankizioù kevredik war an tachennoù na dennent ket d'ar politikerezh; en un eil prantad e teue an trec'h war an tachennoù politikel o-unan. Da skouer, e voe da gentañ aotreet ar c'hevredigezhioù lennegel ha gouezoniell, tra ma chome berzet ar c'hevredigezhioù politikel. Ar re-mañ ne voent aotreet nemet goude, ur wech diframmet ar frankizioù politikel.

Emdroadur keal ar frankizioù foran en 20t kantved.

Hiziv ez eo daouduiek emell ar Stad er gedvuhez. Diouzh un tu e chom an enebadur kozh beli-frankiz, diouzh an tu all ez eo ar Stad gwarezourez un niver a frankizioù a vije en arvar hep hec'h emell.

Devouderezh an emdroadur

A-c'hin d'al luskad mennozioù a savele keal ar frankiz-harzadur, e tiwanet en 18t kantved damkaniezh ar frankiz-perzhiadur. Houmañ, embannet gant J.J.ROUSSEAU, a voe adkemeret gant ar Jakobined c'hall ha gant dispac'herion an 20t kantved.

Damkaniezh jakobinel ar frankiz-perzhiadur.

Ar Gall Benjamin CONSTANT, damkanour ar frankizouriezh en 19t kantved, a enebe "frankiz bremaniz" ouzh "frankiz henvediz", hounnezh termenet gantañ evel "piaouadur peoc'hiek an dizalc'h hiniennel", frankiz henvediz o vezañ "perzhiadur oberiant er galloud-stroll" ha diskuliet gantañ evel un touell, ur sofegzh.

Gant ROUSSEAU e oa bet termenet ar frankiz-perzhiadur. Oc'h ensellout kudenn "bevennoù ar riegezh", e tastume : "Goulenn betek pelec'h ez a gwirioù ar rieg ha gwirioù ar geodedourion zo goulenn betek pelec'h e c'hell ar re-mañ en em ouestlañ ganto o-unan" (3). Savelet e vez frankiz pep hini dre ar perzh kemeret gantañ e furm-idigezh ar mennoud kevredin; dirak ar mennoud kevredin e rank plegañ ar mennadurioù hiniennel. "Ensaviñ ur bobl zo ober da bep hinienn, a zo drezi hec'h-unan un hollenn glok ha digenvez, bezañ parzh en un hollenn vrasoc'h a zegemero an hinienn diouti he buhez hag he boud".

Holl breder ROUSSEAU a denn da ziskoulmañ ar gourzhenebadur etre hinienn ha kevredigezh, da sevel ur gevredigezh na vo ket an hinienn e kenstourm ganti, na vo ket enni eus kudenn an harzerezh, an eneberezh, - ar vonlakadenn o vezañ ober amplegad ar frankiz eus ar perzhiadur er mennoud kevredin.

Adkemeret e voe damkaniezh ROUSSEAU gant ROBESPIERRE ha SAINT-JUST : ar gevredigezh a felle d'ar re-mañ sevel oa ur Republik vertuzius ha poellek dindan diktatouriezh ar mennoud kevredin. Ne veizent ket ar frankiz evel harzadur ouzh ar galloud met evel perzhiadur ennañ.

Ganti e voe levezonet ivez MARX, LENIN na, dre vras, holl zispac'herion an 19t hag an 20t kantved. Ar frankiz ne veizer evel harzadur nemet mar bez fall al levrierezh; mar bez mat, e ra dre ret mad ar bobl hag, e-se, ne c'hell bezañ frankiz ar bobl nemet ar perzh kemeret ganti e graerezh he mad (4). Pelloc'h e welimp meizadur daelerezhel perzhiadur ar bobl er Stad komunour.

Ar varksouriezh : frankizioù furmek ha frankizioù gwerc'hek.

An damkaniezh jakobinel n'he deus ket bet kalz levezon war emdroadur meizad ar frankiz. En enep ez eo bet pouezus-bras levezon ar varksouriezh.

Gant kresk ar broleteriezh c'hreantel e voe tennet an evezh war gudenn embregadur gwerc'hel ar frankizioù. Petra eo ar frankiz-annezañ evit neb a zo hep lojeiz ? Ha frankiz ar wask mar bez perc'hennet ar c'hazetennoù gant mistri an arc'hant ? Petra eo ar frankiz-dezeviñ evit ar re na zegemeront ket ar stummadur a roje dezho an tu da ober gant binvioù an dezeviñ ? Frankizioù un niver bihan oa frankizioù ar frankizourion. Pell 'zo moarvat edo ar gont evel-se : betek an 19^t kantved e veve ar yoc'hoù diwar al labourdouar oc'h asantiñ d'an dere izel ma edont evel d'un devoud naturel. Kemmet e voe penn d'ar vazh avat gant proleteriezh ar c'hêrioù. Houmañ a ziwanas er mare m'edod o paouez embann gwirioù an holl da biauañ ar frankizioù foran. Aes eo kompren o defe ar broleterion goulennet o lod.

Bourc'hizion an 18^t kantved o stourm ouzh ar mac'homerezh politikel a ziskaras ar skoilhoù politikel ha gwironiel a vire outo a biauañ gwirioù kevatal da re ar vrientinion. Dre o diskar avat, e tiazajont ar gwir evit pep den da biauañ an hevelep gwirioù. Hogen, e-kreiz an 19^t kantved, ne oa ket ar yoc'hoù evit embreger ar gwirioù-se en arbenn eus o saviad armerzhel, - daoust ma oa bet engwisket dezho kement frankiz 'oa dre an dezvoù hag ar bonreizhoù. Ur mac'homerezh armerzhel a oa neuze da zezrannañ ha da ziskar. Gant MARX hag ar gomunourion e voe graet an dezrann klokañ.

Ar varksourion a laka ez eus el labour graet gant ar micherour div lodenn : an eil o vezañ kevatal d'ar pezh a zo ret d'ar micherour evit e vevañs, eben o vezañ an hontwerzhad (5), muzul perzhkrouiñ mab-den. Hogen skrapet e vez an hontwerzhad-se digant al labourer gant perc'henn ar madoù-kenderc'hañ, gant ar c'hevalaour. Hemañ a ra e doare da lezel bepred gant al labourer ar barr-bevañ izelañ. Aze emañ ar c'horvoerezh kevalaour : arallekaat a ra ur parzh eus ar micherour. "An den o korvoiñ an den", mac'homerezh armerzhel ar proleter gant ar c'hevalaour, zo poent-loc'hañ ar stourm a renkadoù.

Un dezvarn garv a ren ivez ar varksouriezh war ar frankizioù politikel evel m'o intent ar frankizourion. Evit an darn vrasañ eus al labourerion n'int nemet frankizioù furmek, hep endalc'h gwerc'hek. Gwashoc'h : tunioù int evit ar gevalaourion da zerc'hel o mac'homerezh war ar gorvoidi. Van a reont da reiñ d'an holl frankiz ar wask, frankiz ar c'hevredañ, h.a., met er pleustr emañ ar goubrientoù-se e piau ar gevalaourion, kuzhat ne reont ken ouzh ar broleterion ar gwaskerezh a zo warno. Roet e vez ar gwirmouezhiañ d'al labourerion, met chom a ra ar bruderezh dilennel e dalc'h perc'hennet an arc'hant. Lezel a reer ar vicherourion da amparañ c'hweluniadoù, met prenet e vez ar re-mañ gant ar batromed. Ken ma tisoc'h ar varksourion gant ar c'hlozadur-mañ : keit ha ma pado ar reizhiad kevalaour ha stourm ar renkadoù ne vo ket a frankizioù gwirion.

Ar preder armerzhel kempredel.

Meneget hon eus al levezon o doa bet an armerzhourion frankizour, diskibion Adam SMITH, gant o meizadur eus ar frankiz-harzadur; penaos e varnent bepred a berzh mat ar frankembregañ prevez hag a berzh fall emell ar Stad en armerzh. Hiziv e vez distaolet e pep lec'h seurt damkaniezh, n'eo ket hepken gant ar renadoù evodet eus an dispac'hioù komunour, met ivez er riezoù kevalaour. Evit gwir, emañ an holl riezoù anvet frankizour dindan renadoù armerzhel sturiadet, ha kreskiñ a ra a vloaz da vloaz emell al levierezhioù e kempouez ar moneiz, e stabilded ar prizioù, e reolerezh ar postadurioù, e steuñverezh ar gennadoù prevez, h.a..

Evel m'hon eus gwelet e meur a lec'h c'hoazh ez eo seurt stad a draoù an disoc'h eus meur a emdroadur war un dro. Er-maez eus an emdroadur politikel e-unan, emañ hini ar c'halvezerezh da lakaat e kont : tolpadur ar greanterezh, pouez an imbourc'h gouiziel a ya en tu all da c'halloud an embregerezhioù prevez, - an ijinerezh atomel da skouer ne vije ket anezhañ ma n'o dije ket ar Stadoù kemeret war-eeun en o c'hefridi e ziorren.

Disoc'h an emdroadur

Gant an emdroadur c'hoarvezet en 20t kantved ez eo bet treuzfurmet don keal ar frankizioù foran hag, e-se, ar mennad da vevennañ beli al levierion. Padal, kudenn ar bevennadur ned eo ket steuziet evit kelo.

Treuzfurmadur keal ar frankizioù foran.

Diwanet ez eus un domani nevez a frankizioù foran, o tevoudañ un advezadur eus an domani kozh.

Domani nevez ar frankizioù foran : ar gwirioù armerzhel ha kevredigezhel. Amboaz ar gwirioù-se zo diogeliñ d'ar geodedourion an araëzioù danvezel o deus ezhomm evit embreger ar frankizioù all : ar gwir d'al labour, gwarantadur ur barr-bevañ izek, ar gwir da gaout ul lojeiz dereat, ehanou, ur c'hedskor o wareziñ ouzh ar reuzioù diseurt (kleñvedoù, darvoudoù, kozhni, mammelezh), goprou tiegezh, skorennoù, gwaredoù, h.a. (6). Ar c'heodedour zo dezhañ hiviziken, ouzhpenn e wirioù politikel, gwirioù evel armerzhiad (gwir d'al labour ha d'ur gopr dereat) hag evel kevredigour (7). E-kichen keal ar "Stad arvevat" abeged gant ar frankizourion gozh e kemer lec'h keal ar "Stad warediat" (welfare state).

Un amboaz all ez eus ivez : mirout ouzh an embregerezhioù prevez bras a zrougarverañ o galloud, - se a c'hellont ober pe dre c'hoari gant ar prizioù, pe dre vestroniañ ar Stad hec'h-unan.

E meur a riez e vroadeler ar firmoù o deus diraezet an unwerzhouriezh (8) pe a c'hoari roll ur gwazerezh foran kevredin.

Adveizadur ar frankizioù kozh. Ar frankizioù savelet en 18^t hag en 19^t kantved n'int ket bet dilezet, nemet e kemm o endalc'h. O gwareziñ a reer ouzh emell ar Stad evel a-raok, met ivez ouzh krap an nerzhoù prevez, eleze ouzh ar galloud armerzhel. Diac'h-inad nevez, ar Stad eo a zo fiziet enni an emell da wareziñ ar frankizioù foran ouzh ar galloud armerzhel prevez.

Ur skouer eo hini ar wask. E broioù 'zo e fell d'ar Stad diwall ar c'hazetennoù diouzh o skrapidigezh gant nerzhoù an arc'hant. E broioù all e laka ar Stad he reolerezh war orin an arc'hant a zegouezh e kefioù ar strolladoù politikel. Beli al levierion, e-lec'h bezañ bevnet gant ar frankizioù foran, a dalvez da wareziñ ar re-mañ.

Dislavaroù e-keñver bevnedur beli ar Stad.

Koulskoude, etre ar meizadur kozh eus ar frankizioù foran hag ar meizadur nevez ez eus dislavaroù. Gant ar bonreizhoù da skouer e vez embannet ar frankiz-dezeviñ, frankiz ar wask, ha war un dro gant ar veli lakaet bevennoù strizh pe strishoc'h d'an dezeviñ ha d'ar wask. Meur a ziskoulm zo bet kinniget d'an dislavaroù-se. Amañ ne roimp meneg nemet eus an daou glaselañ : an diskoulm arveret gant ar Stadoù bourc'hizel, an diskoulm marksour.

An diskoulm bourc'hizel : an treuzvarc'had. An diskoulm dibabet er Stadoù-Unanet, e Frañs, e gweriniezhoù Lec'hleñn zo mirout reizhiad ar frankizioù foran ha bevnedur beli ar Stad evel ma voent diazezet en 19^t kantved ha degas kempennadurioù diabarzh d'ar reizhiad-se. Kementad ar c'hempennadurioù a gemm hervez ar broioù : bihan eo er Stadoù-Unanet ma ne vez ket anavezet nemeur evit c'hoazh ar gwirioù armerzhel ha kevredigezhel; bras eo e Lec'hleñn ma talc'h ar c'horvoderioù treuzdoug (9) ul lec'h a-bouez er c'horvoder broadel.

Er riezoù bourc'hizel e vez doujet d'ar frankizioù furmek, hag ar c'hendereoù dibourvesañ o-unan ne lezfent ket d'o lemel, seul vui ma teu tamm-ha-tamm gwerc'hegezh dezho dre berzh gorreadur ar barroù-bevañ.

An diskoulm marksour : an daelerezh. Ar varksouriezh a ginnig he diskoulm evel disoc'h un emdroadur daelerezhel. Ne gomz ket eus frankiz, met eus frankizadur, eus dieubidigezh. Diouzh tri frantad e raktres an dieubidigezh-se : a) Prantad ar Stad kev-alour bourc'hizel; furmek eo ar frankizioù foran er prantad-se peogwir ne reont nemet goleiñ korvoerezh armerzhel ar broleterion;

neoazh e roont d'ar strolladoù dispac'hel an tu da ren o bruder-
ezh, dre-se da vuanaat argerzh-diemprañ ar gevalaouriezh ha da
luskañ an argerzh dispac'hel b) Ur wech diskaret ar Stad vourc'h-
izel, e teraou an eil prantad : hini diktaturiezh ar broleterion;
ar broleteriezh trec'h a aloub framm ar Stad vourc'hizel hag, oc'h
arverañ he binvioù, e stag da zispenn ar c'horvoerezh kevalaour
hag e zroukheuliadoù. Ne c'hell an embregadenn-dispenn-se bezañ
kefleuniet nemet dre ur renad kalet-tre ha ne oufed ket asantiñ
ma ve bevennet obererezh al levierion. Ar frankiz a c'hoarvez
neuze eus perzhiadur pep keodedour er galloud dispac'hel. Ar Stad,
eviti da vezañ aotrouniek-kenan, ne vez ket meizet evel gwaskerez
ar frankiz, met evel dieuberez, peogwir e labour da zistrujañ ar
sklavelezh kevalaour k) Erziwezh, pa vez peurzispennet kement
dilerc'h 'zo eus ar gevalaouriezh ha savet uhel a-walc'h ar barr-
bevañ, e teu diktaturiezh ar broleterion d'he dibenn hag e ter-
aou "prantad uhelañ ar gomunouriezh". Dizeriañ a ra ar Stad, mont
a ra al levieriezh da get, o lezel an dud en o frankiz klok.

Dav eo lavarout n'he deus bro sokialour ebet tizhet pelloc'h
egret an eil prantad.

-
- (1) Sl. An dislavar politikel, Emsav 24/349 1968.
 - (2) Sl. Ar galloud hag ar gwir, Notennoù Politikel (3), Emsav 27/87 1969.
 - (3) J.J.ROUSSEAU, Contrat Social II 4.
 - (4) A-zivout an divezouriezh komunour, sl. Galloud ha destrizh, Notennoù Politikel (2), Emsav 26/62 1969.
 - (5) Sl. Damkaniezhoù an helv, Notennoù Armerzhel (9), Emsav 10 /277 1967.
 - (6) Sl. Diogelerezh Kevredigezhel, Notennoù Armerzhel (8), Emsav 9/246 1967.
 - (7) Sl. Goprou kevredigezhel ha kevredikaat, Notennoù Armerzhel (8), Emsav 9/245 1967.
 - (8) Sl. Rummadur an nevidoù, Notennoù Armerzhel (17), Emsav 20 /243; An unwerzhouriezh rik, Notennoù Armerzhel (18), Emsav 22/303 1968.
 - (9) evel (7); sl. ivez Ar gevalaouriezh a-vremañ, Notennoù Armerzhel (19), Emsav 23/341 1968.